

**Maoris ar C'HOLLO**  
**Ar Misionoù e Breizh**  
**er XVIIvet kantved**



**IMBOURC'H**  
**1984**

IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Pemzekvet bloavezh

Niverenn 169

31 Genver 1984

TAOLENN

Notennoù beaj, gant Youenn Olier.....p.5  
Beaj KRISTENION BREIZH da Iwerzhon e dibenn an  
hañv.....P.22  
Ar misionoù e Breizh en amzer Mikael an Noblez hag  
an Tad Maner, gant Maoris ar C'Hollo,.....p.23  
Un tammig addispleg.....p.63

=====  
Koumanant-bloaz : 100 lur (adal Genver 1984). KRP:  
1 534 25 N Roazhon Y. Ollivier.E miz Genver e krog  
ar c'houmanantoù ha reiñ a reont ar gwir da zegemer  
ar stagadennoù.

Embannet e vez IMBOURC'H a-berzh ar gevredigezh  
KENEILED IMBOURC'H. Ar skodenn-ezel a dalvez da  
goumanant d'ar gelaouenn IMBOURC'H.

Niverenn-wask : 50 015

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.  
Burloud, 35 000 ROAZHON.

=====

KEMENN

An niverenn-mañ a zo an hini gentañ eus ar bloavezh 1984 a vo gouestlet da ZEVZHIOU-STUDI Penarth. Enni e vo kavet un danevell eus ar veaj hec'h-unan hogen dreist-holl displegadenn pouezus Maoris ar C'Hollo diwar-benn ar Misionoù e Breizh er seitekvet kantved.

Un eil niverenn a vezo gouestlet da ZEVZHIOU STUDI Penarth a-raok an hañv.

Youenn OLIER

NOTENNOU BEAJ

Kent embann ar prezegennoù bet distaget hag ar c'haozeadennoù bet dalc'het da geñver hor chomadenn e Kembre e deroù miz Gwengolo 1983 - unan eus ar re bouezusañ a vo kavet en niverenn-mañ - e klaskin sevel un danevell eus hor beaj hec'h-unan pe, kentoc'h, eus an devezhioù-studi hon eus renet du-hont, hag a zo bet devezhioù-studi etrekeltiek e gwirionez.

Aet e oamp kuit eus ar gêr d'ar sul da noz, 28 a viz Gwengolo. An emgav evit ar Vrezhoned a oa e presbital Plouneour-Menez, e ti Youenn Troal, person ar barrez, e-lec'h etleemp nozvezhiañ. Divizet e oa bet e savfemp war vourzh ar c'hCornouailles evit treizhañ Mor Breizh diouzh an deiz.

D'abardaez ar sul em boa loc'het diouzh Kistreberzh ha graet ganin un dro e Damgan da gimiadiñ diouzh an tiegezh a dremene ar sulvezh d'enderv war an aod em boa skoet war-du Gwened, - dre ar gourhent, betek an Alre ; alese ez is gant hent Pluvigner ha treuzet ganin Baod em boa tizhet Kistinid e tro seizh eur.

Eno e oa Marsel Blanchard, person ar barrez, ha

Paol Kalvez, sekretour KRISTENION BREIZH, ouzh va gortoz rak gant karr ar person e tleemp ruilha betek Plouneour-Menez, - pezh a oa un tamm brav a hent d'ober c'hoazh. Ha ni war-raok, war-du Menez Are ha bro-Leon, a-dreuz ar vro Bourlet ha Kernev ar Menezioù Du, dre ar Gemene ha Gourin, kêr c'hendidik hor mignon, Marsel Blanchard, e-biou da Venez Sant-Mikael, betek Plouneour-Menez, hor boa diraezet war-dro nav eur hanter pe dek eur, noz teñval anezhi, war-lerc'h ur redadenn a 200 kilometrad bennak (evidon-me atav) ; evurusamant omp boazet da redek an hentoù... hag e vez gwellaet ar re-mañ bep bloaz dre aked an amaezhierzh gall (n'ouzon kethabez' e rahemañ an dra-se a-ratozh evit aesaat beajoù KRISTENION BREIZH!)

Du-hont e oa degouezhet dija izili all eus hor stroll, Yann-Vari Bouessel du Bourg, hag e verc'h, Nolwenn; Tepod, en doa hon ambrouget e Kembre en deo ; an daou berzhiad all, Maoris ar C'hollo, beleg, hag Ivona Varzhin, a zlee dont d'hor c'havout antronoz da Rosgo.

Youenn Troal en doa aozet koan deomp. Hogen daoust ma tleemp sevel gwall abred antronoz veure - war-dro pemp eur hanter - ne c'helljomp ket mont da ziskuizhañ diouzhtu. Ne oa ket echu gant Paol Kalvez kempenn an doare etrekeltiek eus "PEDENN AN ILIZ" a zleemp ober gantañ e Kembre, en teir yezh keltiek pennañ : brezhoneg, kembraeg, iwerzhoneg. Dav e voe ober gant luc'hastaoler person Plouneour betek hanternoz hanter bennak. Se 'zo lavarout e voe berrik hon nozvezh rak da c'hwec'h eur hanter pe seizh eur e tlee digaeñ ar c'hCornouailles.

Evelkent e oamp degouezhet e porzh Rosgo d'ar poent merket da veure, pa oa an deiz o tarzhañ ; gras am boa kavet o tiraerz ar porzh, koulz eo din anzav, rak dont a rae trouzioù iskis gant karr ar Bigouter, - Youenn Troal, - trouzioù gwallziouganus a seurt gant ar re a vez laosket gant ar gweturioù

a vez oc'h ober o zalaroù ha prest da leuskel o huanad diwezhañ (abaoe 'm eus klevet keloù mat diwar-benn yec'hed ar c'harr met d'ar c'houlz-se e oa sklaer e ranke kaout armezeg war e dro!)

Treuzet hor boa Mor Breizh hep trubuilh ebet, nemet evel m'em bez merket tro pe dro, un tamm undoare e vez bepred ur vordreizhadenn a seurt-se. Kaer e oa an amzer, nemet fresk, na petra, da veure, dreist-holl avat an avel vor hec'h-unan.

\*\*\* \*\*

Ar wech-mañ hor boa divizet mont da Gembre dre an hent-houarn. Eus porzh-mor Plymouth enta e oamp aet d'ar porzh-houarn e-barzh taksioù (reoù giz kozh, espar a-walc'h). O vezañ avat ma ne loc'he an tren nemet e deroù an endervezh hor boa kavet mat mont da verennañ e kêr. Goude bezañ savet war-grec'h e-pad ur pennad, e-biou d'ur c'hourstraed, - a hañvale ober tro Kêr bPlymouth - e oamp diskennet dre ur blasenn ec'hon betek ur straed-treuz en ur c'harter edod o kempenn d'an ampoent, labourioù war vont en-dro a-zehoù deomp, hag a-gleiz, ur mell savadur karrezek liessolieradurek e brikennoù arruz : hini Lu ar Silvidigezh, aroueziet gant ur pezh pikolpanell a-dreuz an talbenn (bez' ez eo Lu ar Silvidigezh un aozadur relijiel na na vez ket gwelet kalz al liv anezhañ en hor bro, moarvat).

Tapet merenn ganeomp en un tammig leti "boued-prim" eus ar c'horn - e-lec'h e tisoñjas hor mignon Maoris ar C'hollo e vantell... a voe adkavet war hent an distro - e oamp savet war-dro un eur en un tren a zlee kas ac'hanomp betek Bristol. E-pad un herrad hor boa hedet an aod, o pakañ un taol-sell kaer war devennoù ar bae en em astenn a-hed levioù ha levioù tro-war-dro. Pelloc'h e troe

al linenn war-du ar Gwalarn ha Bristol e-lec'h e tleemp tapout un tren-klotañ da vont da Gembre. Plasoù d'azezañ hor boa kavet en ur bagon; en hor c'hichen edo un doare pastor protestant bennak, da vihanañ, ezel eus ur gronnad protestant bennak, evel maz eus e-leizh anezho e broioù Breizh-Veur; divizet hor boa un tammig, e saozneg avat, ha n'oamp ket aet gwall bell gant hor c'haoz rak - koulz eo din lavarout deoc'h - n'on ket mailh evit komz yezh Shakespeare a lennan didenn-kaer koulskoude.

Paz eer dre an hent e tizher Kembre dreist d'ur pont-e-skourr o c'haoliañ ar Stêr Havren, uhel a-walc'h en hanternoz; an aber-se eo a ya d'ober harzoù Kembre e kreisteiz ar Vro ha n'en deus ket ouzhpenn un nebeut kantmetradoù treuz. Dre al linenn-houarn avat e tizher Kembre e penn ur riboul kleuziet dindan ar stêr, un tamm mat ize-loc'h er c'hreisteiz moarvat, hag a zo hirik, rak pemp munud bennak - a gav din - a vez lakaet gant an tren a-benn diboufañ war zouar Kembre.

\*\*\* \*\*

E porzh-houarn Kêrdiz edo hor mignon mat Tim Saunders, ur c'herneveurad, ouzh hor gortoz war ar c'hae. Kejet em boa gantañ er bloaz a-raok, pa oan bet oc'h ober un dro e Kembre da geñver gweladenn ar Pab Yann-Baol II e broioù Breizh-Veur; marteze o deus soñj hol lennerion eus an danevell am eus embannet e sigur ar veaj-se; displeget hor boa peurgent e oa dimezet ar c'herneveurad-mañ d'ur gembreadez hag e save e vugel e kerneveureg. Jentil a-walc'h e oa bet Tim enta evit hon diambroug war ar c'hae ha divizout ganeomp ur c'hardeurvezh bennak, amzer deomp da dapout an tren bannlev a zlee hor c'has da bPenarth e-lec'h e oamp erruet - m'em eus sonj mat - war-dro seizh eur bennak

d'abardaez.

Bez' ez eo Penarth un doare "adkêr" da Gaerdydd end-eeun, evel Saozon, Mordel pe Bazieg da Roazhon, lakaomp, war ribl ar Stêr Havren avat, ha da vont di hor boa hedet ur gennad ijinerezhel divalav a-walc'h, evel kement gennad ijinerezhel a zo. N'emañ ket Penarth er c'horn-se avat; kentoc'h ez eo, a gav din, ur seurt rangêr leveidi pe izili eus ar renkad etre o labourat e Caerdydd avat; ur rangêr chom-ha-kousket, enni balioù ledan, gwez plantet a bep tu dezho, a zlee kregiñ da goll o delioù gant ar barroù korventenn a oa da c'hoarvezout en deizioù war-lerc'h, ha penn-da-benn dezho kenkizioù koant ha kempenn, pep a liorz dirazo peurvuiañ, e brikennoù ruz, na petra, toet ivez gant teol ruz; ar Gembre-se a dennfe kentoc'h da hanternoz Bro-C'hall - am eus anavezet em bugaleerezh - eget da Vreizh, ret eo lavarout.

Moarvat e tle chom un toullad kembraegerion er rangêr leveidi pe vourc'hizion-mañ; ur gembraegerez, da vihanañ, hor boa diskoachet en ur stal ma oan aet d'ober prenaennoù enni gant Paol Kalvez e-kerzh ar sizhun (ha c'hoazh ne ouie ket mat ar yezh), hini all ebet avat e-touez broiz ar c'horn-se. Padal, dav eo din merkañ e oa skridaozet e kembraeg hanter ar banell-gemenn e-tal iliz katolik Penarth, un iliz bras a-walc'h, gyda llaw, hag hor boa bet tro da weladenniñ e-pad ar sizhun, dalc'het e-ratre, nevez-flamm, a vije bet kredet, evel kement iliz pe chapel a zo er vro-mañ (lieskantvedek e vez alies, er c'hontrol, hon ilizoù-ni - da vihanañ e kornog ar vro), nemet e oa e saozneg hepken al lizheradur speredel a oa kinniget da brenañ d'ar fideled war an treuzoù. Marteze e oa dleet ar banell-gemenn kembraek da levezon ar skrivagner kembraek katolik bras, Saunders Lewis, a zo bet ivez unan eus diazezerion STROLLAD BROA-

DEL KEMBRE e 1925 ; abaoe pell emañ ar brogarour-  
mañ o vevañ e Penarth, ur c'hardlev bennak war-  
draoñ diouzh hol leti. Ur wech em boe tro da  
ziskenn betek diaz ar vali e-lec'h emañ ti-annez  
ar skrivagner, ur c'henkiz e brikennou ruz bepred,  
evel kement ti a zo er c'harter ; merzet em boa ur  
c'harr-tan er c'harrdi (ur 'vuoc'han' giz kozh, ur  
Volkswagen a wechall). Hogen n'em boa ket goulen-  
net digor ; dija e oa aet an Tad Diarmaid O Laoire  
- a oa o kemer perzh en hon devezhioù-studi ha mi-  
gnon d'ar skrivagner - d'ober gweladenn, ha lavaret  
e oa bet dezhañ e oa bet nevez dezouget Saunders  
Lewis d'an ospital : ouzhpenn 90 vloaz eo ar skri-  
vagner ha tapet en doa anouet er sizhun a-raok  
(eveldon va-unan rak gant ur pennad sifern eus ar  
gwashañ edon e Penarth, ur pennad sifern am boa  
degaset eus Breizh, ha kollet va mouezh ganin  
penn-da-benn). Keuz am eus bet evelkent da vezañ  
chomet hep gellout kejout ur wech adarre, da viha-  
nañ, gant ar skrivagner, pa oan o tremen er gêr  
m'edo o vevañ enni ; ar wech nemeti m'em boa e  
welet e oa e Dulenn e miz Gouere 1947, dreist-holl  
da geñver al lid a oa bet aozet e Bered Vroadel  
emsavidi Sizhun Fask er gêr-se. Moarvat, n'eus  
forzh penaos, n'en dije dalc'het soñjebet eus an-  
nig yaouank en em gave en e gichen en devezh-se.

Ne zleemp gwelout 'personelezh' ebet p'edomp e  
Kembre. Padal o devoa kavet ar veleion a oa gane-  
omp e Kembre an tu da weladenniñ arc'heskob nevez  
Caerdydd, ur c'habusin nevez erruet da gemer lec'h  
ar C'hardinal Murphy, roet gantañe zilez en abeg  
d'e oad er mizioù kent. A orin saoz eo, a gav din,  
an arc'heskob nevez, ha ne gav ket din e oufe kem-  
braeg daoust dezhañ bezañ graet ur brezegenn-  
donedigezh a roe un tamm pouez da dalvoudoù seve-  
nadur Kembre, a gav din. Spiet e oa bet gant lod  
brogarourion gatolik e Kembre, e vije bet anvet ur  
c'hembraeger - a seurt gant an Aotrou Mullins am

eus graet meneg anezhañ em danevell eus va beaj e  
1982 e Kembre - hogen evit abegoù zo - a orin  
iwerzhonat ha saoznekaet eo ar pep brasañ eus ka-  
toliked Kembre - ne oa ket anvidigezh ur seurt  
kembraegour ur retvez vallus e Kembre ; an Aotrou  
Mullins - an hini en doa kenlabouret da sevel ur  
film e kembraeg diwar-benn ar Vatikano e 1982, bet  
bannet da vare donedigezh ar Pab e Caerdydd, - a  
zo manet adeskob e kreisteiz Kembre ; diwar vremañ  
avat emañ o chom en Abertawe - d'ur mare eo bet  
person pe gure e Maesteg e-lec'h eo bet anavezet  
gant hor mignon Dafydd Dafis - hag eñ o plediñ  
gant al lodenn-se eus an eskopti.

\*\*\* \*\*\* \*\*\*

Neuze 'ta e oamp en em gavet war-dro seizh eur  
d'abardaez en hol leti, un doare skol vichereel  
evit ar merc'hed, a denne kentoc'h, e gwirionez,  
d'ur c'henkiz bras, heñvel ouzh ar c'henkizioù all  
eus ar c'harter, nemet e oa gronnet gant ul liorz  
ec'hon, plantet enni gwezennoù bras gwaskedek ;  
stag ouzh ar 'pennti' e oa savadurioù skañvoc'h,  
'rakterket', adtiez'ta, a servije da salioù kentel ;  
en unan anezho e veze lidet an oferenn bemdez e  
brezhoneg gant unan eus ar veleion vrezhon a oa  
ganeomp, pe en iwerzhoneg gant an Tad Diamaid O  
Laoire ; eno ivez e veze lavaret "Pedenn an Iliz";  
hag eno bepred, na petra, e voe roet abadennoù kan  
pe goroll breizhat evit hon ostizidi. Hon emvodoù  
avat a veze dalc'het er 'pennti', en ur sal-glas  
ordinal-tre, e-lec'h edo lakaet war ar siminal un  
delwenn eus sant Tomaz Moore en doa kavet gwell  
mervel eget renaviañe feiz katolik er XVIVet kant-  
ved.

\*\*\* \*\*\* \*\*\*

Ne roin ket amañ un diverradur eus ar prezege-

noù a voe distaget da geñver an Devezhioù-studi ; kavet e vo amañ skrid an hini gentañ anezho hag a bled gant Misionoù ar seitekvet kantved e Breizh, un destenn 'hudverzet' en emsav e dibenn an ugentvet kantved pe he deus pourchaset hepken danvez d'ober goap ; moulet e vo an 'darlizhoù' pe ar c'haozeadennoù all en un niverenn arbennik ouzhpenn eus ar gelaouenn a-raok an hañv. Notañ a raïmp a-hend-all ez eus bet roet div 'zarlizh' gant Kembreiz e brezhoneg, unan gant J.P. Brown hag eben, gant Dafydd Dafis. Displegadennoù all a voe roet gant Marsel Blanchard ha Youenn Troal, - ha ganin-me va-unan. An holl destennoù-se, evel m'hon eus merket, a vo kavet en unan eus niverennoù da zont ar gelaouenn.

Ar peb brasañ eus ar breutadegoù a voe dalc'het e brezhoneg, o vezañ ma ouie an holl berzhidi brezhoneg, nemet e voe implijet ivez ar c'hembraeg - pa oa deuet, da skouer, ur gelennerez war he leve eus Penarth da selaou prezegenn J.P. Brown - am boa harpet da lakaat e skrid e brezhoneg, nemet a oa bet lennet ganti er yezh orin ; hag ivez un tamm saozneg pa oa deuet ur c'herneveurad hag ur gerneveuradez eus Bristol ha Kernev-veur d'hor gweladenniñ ; un tamm kerneveg a ouie ar re-mañ met tamm brezhoneg na kembraeg (pezh a ouie evelkent ar c'herneveurad yaouank a oa deuet da gej ouzhimp war ar c'hae e porzh-houarn Caerdydd, - Tim Saunders, a oa distroet davedomp e-kerzh ar sizhun) Hogen ar c'hembraeg eo a voe arveret ar muiañ en tu-hont d'ar brezhoneg rak hini ebet eus ar vrezhoned ne ouie iwerzhoneg tra ma ouie Iwerzhoniz mat kembraeg ha brezhoneg estreget o yezh-int ; ha na petra, kembraeg eo a veze implijet ivez pa zeue kembraegerion d'hor gweladenniñ, - da skouer, rener (pe unan eus renerion) Mirdi Kembreat Broadel San Ffagan, war lez-kêr Caerdydd, a oa deuet da dremen

un "nozvezh laouen" ganeomp e Penarth gant e bried hag e zaou vugel ; ar re-mañ o doa kanet gant kalz a ampartiz kanennoù kembraek bet desket ganto er skol kembraek a bleustront (gouzout a reer ez eo stank ar skolioù kentañ hag eil-derez kembraek e Kembre).

Dres e oamp aet d'ar merc'her goude kreisteiz da weladenniñ Mirdi Broadel San Ffagan end-eeun. Emañ ar Mirdi-se en tu all da Gaerdydd, un ugent kilometrad bennak diouzh Penarth. Savet e oamp en-ta en tren bannlev a gas da Gêrbenn Kembre - gwell a se n'êdo ket pell ar porzh-houarn diouzh hol leti, hag e Porzh-ar-C'hirri, tostik da Borzh-houarn Caerdydd end-eeun, hor boa kavet ur c'harrboutin hag en doa hon dezouget, dre biou gourfiorzh Pont Canna, betek San Ffagan.

Arabat faltaziañ Mirdi San Ffagan evel ur mell savadur a seurt maz eo ar mirdioù hag a vez staliet e-kreiz kêr peurvuiañ. Bez' ez eo San Ffagan ur mell pikol domani war ar maez, hag en em astenn a ra penn-da-benn da nouspet kant devezh-arat. Pa zegouezhit e spurmantit ur maner bet profet gant ur brientin bennak, a gav din, nepell diouzh un iliz-parrez vihan (hini San Ffagan, emichañs ; n'ouzon ket ha bez' ez eo ar sant-mañ unan gant hini hor 'Ploufragan'-ni), war he zro ur vered kozh hanter dilezet. Ar maner e-unan ne zle ket bezañ ken kozh-se, a gav din, eus ar seitekvet kantved marteze (n'ouzon ket ha bez' e oa ur c'hembread eus an hini a savas anezhañ). Ar savadur -mañ, n'eus forzh penaos, n'eo nemet un elfenn, moarvat an elfenn-orin, en istor ar Mirdi poblet-mañ ; me ' lavar 'poblet' peogwir ez eo sevenadur holl renkadoù ar gevredigezh kembreat a wechall a zo bet adsavet ennañ evit ar weladennerion ; buhez an noblañsoù eo, da skouer, a zo dameuc'het er maner ma tremener drezañ o vont tre en domani ; arrebeuri kaer da sabatoù a ziskouezer deomp



e kembroù ar maner ha, na petra, doare-bevañ an annezourion anezho gwechall, - a zo kentelius-meurbet ; pep tra a zo bet miret er stad m'edo pe ma tlee bezañ en amzer maz eo bet savet ar c'has-tell da gentañ.

Ur meni gourliorzha eo ar Mirdi, hon eus lavaret, strewet penn-da-benn dezhi, krec'h-traoñ, gweleadoù bleunioù, letonnennoù ha pradeier ; kavet e vez zoken deñved o peuriñ ; n'eo ket lavaret avat ha bez' ez int eus gouennoù kozh ar vro ; artizanet o fardañ bitrakoù giz kozh evit an droiadourion a vez kavet ivez (siwazh, gwisket int evel en hon amzer!) ; ha neuze, bochadoù gwez uhel, koadoù bihan ; hag ouzhpenn, savadurioù a bep seurt, bet degaset a bep korn a Gembre, hag adsavet er Mirdi, dres er stad ma oant d'ar mare maz int bet savet da gentañ, daou pe dri c'hantved zo. Evel-se e c'hellit arvestiñ ouzh ur 'chapel' emdennat eus an triwec'hvet kantved, unan metodistat, 'astaolet' dres evel ma oa d'ar c'houlz ma veze pleustret gant kanttroidi an adreizh war ar maez e Kembre. Gweladenniñ a c'hellit ivez un doare labouradeg evit kenderc'hañ lin - a gav din - o vale diwar gremm ur wazh-dour (ur vilin-dour, na petra) hag a zo barrek bepred da broduiñ lin evel ma veze graet gwechall ; ur 'skiber' ez eus bet adsavet ivez, ur seurt grignol evit an ed, mar karit ("ysgubor" e kembraeg ; evit gwir ar ger brezhonek "skiber" ha na gaver nemet e geriadur Vallee en deus kollet ar ster-se, a soñj din) ; 'astaolet' ez eus bet ivez un "aotrelec'h", un ti-telloù war dreuzoù kêr, e-lec'h ma veze paeet taosoù gant ar genwerzhourion o tont da ginnig o marc'hadourezh e kêr h.a. E berr gomzoù, evel m'hon eus merket, klask a reer er Mirdi daskoriñ un endro kevredigezhel ha sevenadurel a wechall, hini blouezet Kembre a gentaoù, met ivez hini gêrat Breizh-veur dre vras (gwiskamantoù merc'hed eus kêr en XIXvet kantved, da

skouer) e-barzh tiadurioù zo.

Un istor a zo d'ar Mirdi-mañ ez eus bet klasket diazezañ war-dro ar bloavezhioù '30, gant un den a oa e anv Iorwerth C. Peate, diwar batrom Mirdioù Poblel all a seurt-se bet digoret e broioù Lec'h-lenn ; er broioù-se en devoa beajet an imbourc'her-mañ, ha lennet em boa dres goude ar brezel ul levr hag a oa bet savet gentañ ha gouestlet end-eeun d'an oberenn en doakroget da seveniñ adal kreiz ar bloavezhioù '30 (war-dro ar c'houlz-se oa bet embannet ar skrid-mañ, ma n'on ket faziet).

Un tamm pouez en deus bet Iorwerth C. Peate e buhez kefredel e vro en hanterenn gentañ ar c'hantved-mañ. Tro am eus bet da lenn meur a oberenn savet gentañ : barzhoniezh, arnodskridoù, eñvorennoù h.a. m'en em ziskouez drezo evel ur c'hefredour kembraek 'keitat' eus an etrevezh-brezel : broadelour ha frankizour, kristen modernour war dachenn ar feiz protestant ; pell a-walc'h diouzh e re ez e savlec'hioù ar rummad kembreiz a zo deuet war dachenn an emsav abaoe ar bloavezhioù '70, da skouer : digristen ha difeiz krenn ez int, lakaomp ; da nebeutañ eo sklaeroc'h o emzalc'h (ne gomzan ket eus an dornadig Kembreiz a zo bet gounezet en-dro d'ar feiz reizhkred hag a zo dister-tre o niver).

Bezeta vezo, n'hon eus e Breizh ensavadurebet a c'hellfe bezañ keñveriet ouzh hini MIRDIOBLEL San Ffagan, daoust maz eus e Roazhon ur gevrenn a zo gouestlet da sevenadur plouezet kozh hor bro.

\*\*\* \*\*

Ne oamp distroet da Gaerdydd nemet d'un enderv all da bourchas levrioù en ul levr di kembraek, an Oriol, e-tal an iliz-kador gatolik, evel m'hor boa graet dija pa oamp deuet da Gembre daou vloaz a-raok.

D'ar sul e fellas deomp mont betek Pont-Faen, da gejout gant kembraegerion gatolik da geñver an oferenn a vez lidet bep sul en ilizig vihan 'Sant Cado' (ur sant a vez enoret kerkoulz en hor bro). Feurmet hor boa tri zaksi evit mont di. Un tammig kerseüs e voe hon troiad ar wech-mañ, - da gentañ dre ma oa berr an amzer ganeomp, divalav an hin, goloet ha teñval, ha distank a-walc'h ar fideled, distankoc'h eget daou vloaz a-gent. A-boan hor boe amzer da eskemm un nebeut gerioù gant hor mignon Dafydd Dafis hag ar beleg Reagan (n'eo ket kar d'an Arlevier, se a c'hellan asuriñ deoc'h), ur c'hembread iwerzhonat kembraeger : dav e oa deomp distreiñ diouzhtu da Benarth.

\*\*\* \*\*\* \*\*\*

Daoust hag un tamm brud a reas Devezhioù-studi KRISTENION BREIZH e Kembre ? Eveljust ne oa ket ar vignoned hon eus er vro-se dic'houzvez eus an darvoud ; a-hend-all e voe meneget hor c'hendalc'h ur wech pe ziv er skingomz kembraek e Caerdydd, e ser un emziviz gant an Tad Diarmaid O Laoire. Deuet e oa ivez ur c'helaouenner eus "The Universe" o chom e Caerdydd d'hon aters un nozvezh e saozneg; roet hor boa dezhañ titouroù e-leizh diwar-benn KRISTENION BREIZH hag an emsav dre vras. N'ouzomp ket avat hag embannet eo bet danvez an emziviz ; marteze e oa ar boued-se re greñv evit lennerion ar gelaouenn gatolik-se, ur seurt "La Croix" ma komprenomp mat. Savet e oa bet ivez un danevell-skrid kembraek evit ar gelaouenn gembraek etrerannilizek CRISTION a zlee dont er-maez hag hi renet gant kristenion yaouank eus Kembre; e devoud ez eo bet embannet ar pennad-se e-barzh niverenn gentañ ar gelaouenn e dibenn ar bloaz tremenet.

Ret eo lavarout e oa diaesd'an holl Gembreiz a garje bezañ en em gavet ganeomp ober un hir a veaj betek

Penarth a zo lec'hiet e korn izelañ Gevred Kembre, koulz lavaret ; rak Kembre a zo bras evelkent, hag ur frapad mat a hent a zo eus an hanternoz d'ar c'hreisteiz (ha dreist-holl, evel e Breizh, n'eus ket a c'hourhentoù da dreuziñ Kembre eus an Norz d'ar Su : ur Stad kreizennet evel Bro-C'hall eo 'Breizh-veur' evelkent). Daoust da se e oa deuet d'hor c'hevarc'hañ un toullad Kembreiz ha Kerneveuriz ; e tro 25 a weladennerion a zo tremenet dre hon devezhioù-studi, ar pezh n'eo ket fall evit ar c'houlz-se eus ar bloaz hag a glote gant ar pal hor boa merket deomp.

\*\*\* \*\*\* \*\*\*

Ur gerig diwar-benn hol leti a oa kempenn ha klet evit ar peb brasañ, nemet un tammig dirapar e lec'h pe lec'h, ha kenaozet iskis a-walc'h a-wechoù (ur souezh e oa ar sal-dour, da skouer). Un tammig disaour e oa ar boued, diseurt bep an amzer evit hor staonioù kevandirel, yac'hus avat, se a zo sur. Gant hon ostizez avat e voemp ar muiañ sebezet. D'ar c'hentañ sell en dije krêdet unan e oa anezhi hini pe hini eus an dimezelled kozh-se en em ziskouez e-barzh romantoù Roparz Hemon bep ar mare, munut hag izil ma hañvale bezañ, dezhi ouzhpenn - a gave deomp - un doare breizhveurat-rik (gant fichadur he blev ha me 'oar-me). Dizoleiñ a rejomp hep dale avat e oa anezhi ... ur c'hallez eus Poatie. Penaos e oa deuet a geit all da dapout douar e kreisteiz Kembre, se a zo ur mister ha na glaskjomp ket sklaeraat. Spi am eus ne vo ket bet kerseet re gant hon doareoù, pa ne oamp ket evit rannañ ger er yezh a zleje bezañ bet hon hini, d'he soñj, moarvat. A-benn ar fin ne ouie mui ar paour-kaezh dimezell peseurt yezh 'oa dleet dezhi komz, pa oa troet he skol d'ur gwir Tour Babel ; peadra 'oa da sodiñ e gwirionez. Evelato e voe hegarat ha jentil ouzhimp betek ar

penn ; anaoudek omp bet outi evit bezañ roet bod deomp en un doare ken didro.

\*\*\* \*\*\* \*\*\*

D'al lun hor boa loc'het diouzh Penarth, abred diouzh ar mintin : war-dro seizh eur hanter edomp e porzh-houarn Caerdydd ; eno hor boa kimiadet diouzh Iwerzhoniz hag Ivona Marzhin a gendalc'he gant he beaj etrezek Dulenn.

A-raok echuiñ ha klozañ an danevell-mañ e rin un evezhiadenn bennak diwar-benn stuz al lodenn-se eus Morganwg hon eus bevetenni. Boazet eur da geñveriañ Kembre ouzh Breizh ha da lavarout ez eo kalz kembraekoc'h Kembre eget nad eo brezhonek Breizh. Padal e hañval korn-bro Penarth bezañ bet trevadennet gant leveidi saoz deuet da echuiñ o buhez eno ; o merzet hon eus e deroù hor chomadenn - pa oamp aet d'ober un dro-vale betek an aod : war ur chaoser-prenn o vont war-raok dreist d'ur c'hro en em gavent, - azezet pe kentoc'h, diflaket war gadorioù pe vankoù (m'oa ret da unan paeañ evit kaout ar gwir da deurel e bouez warno), hag int erru er pevare oad, da nebeutañ, o tommheoliañ e-giz kizhier kozh, chas bihan war o zro, ha saoz-neg ganto leizh o genoù eveljust. Arvestiñ a raent ouzh ur mor ezvezant d'ar c'houlz-se rak tre anezhi ha ne oa da welout penn-da-benn d'an aod nemet lec'hidegoù a-ziwar-wel ; ret eo lavarout e tenn genoù an Havren da hini al Liger e Breizh, izel e ribloù, bas ha leiet e zourioù.

Nag ar re yaouank ? Ar re ez omp en em gavet e-tal dezho en un davarn, un noz ma oamp aet da evañ ur banne goude bezañ kaset hon lizhiri betek an ti-post, ne oant ket kalz kembraekoc'h, a gav din. En o zouez e oa un toullad punked - merc'hed dreist-holl, a gave din e oant darn eus folklor Breizh-Veur peogwir en o adkavis e Plymouth met a

zizolois ivez e Roazhon da c'houde, ken livus all, galleg ganto ar wech-se, nemet... o kanañ e saoz-neg 'michañs, evel maz eo ar c'hiz war ar c'hevan-dir. E Plymouth, ret eo lavarout, e oa ar bunked eus ar c'hentañ, gant o fichadur-blev peurgent, ha karet em bije a-walc'h o filmañ nemet n'em eus ket kredet rak n'ouien ket peseurt ersav a c'helle kaout ar seurt gouezaj dirak ur c'hamera.

A-hend-all, e Caerdydd hec'h-unan, dreist-holl war an hentoù-houarn, ez eo kalz stankoc'h tramoriz a liv eget e Roazhon pe en Naoned zoken. Peseurt perzh avat a c'hell kaout hevelep poblañs e sevedadur istorel ar vro ? N'eus forzh penaos e vezont desavet evel Breizhveuriz. Seurt enbroadur, maz afe war stankaat en amzer-da-zont, - hep kontañ hini ar Saozon met ar re-se, war va meno, a vefe aes a-walc'h kembraekaat, a lakfe kudennoù da sevel er vro (dek Makoto e Breizh n'int ket ur gudenn ; hag e KRISTENION BREIZH hon eus un Afrikad du brezhoneger ; kant mil avat a lakfe diaes an emsav moarvat ; gwir eo n'omp ket erru er par-se c'hoazh!)

\*\*\* \*\*\* \*\*\*

Tremenet e oamp adarre dre riboul an Havren, kemmet tren e Bristol, ha skoet adarre war-du ar c'hreisteiz. Bez' e tleemp lestrañ war-dro un eur d'enderv. Siwazh, gant ar gorventenn e oa bet daleet spontus ar mordreizher a zlee hor c'has endro da Vreizh ; ne zigaeas ar vag nemet e tro nav eur.

N'hor boa ket kollet hon endervezh evelkent. Deuet e oa ur c'houblad Kerneveuriz d'hor gweladenniñ, Ken George hag e bried hegarat, M.L. Fave, ul leonadez, - ha chomet e oant da zivizout ganeomp betek c'hwec'h eur d'abardaez, diwar-benn kudennoù ar yezh kerneveurek hag emsav Kernev-Veur ; disteroch un tamm eo nerzh hemañ eget hini emsav

Breizh, ha se a zo aes da gompren : kalz bihanoc'h eo Kernev-veur eget Breizh ; n'he deus bet istor politikel dishual ebet, koulz lavaret ; ha war ar marc'had ez eo marvet ar yezh poblek un daou-c'hant vloaz bennak a zo, e tro 1800. Hiniennoù o deus klasket, a-hervez, adkavout en trefoedajoù saoznek a vez komzet hiziv el ledenez distagadurioù ar gerneveuregerion a wechall,- pezh n'eo ket diboell a-grenn, pa ouzer, da skouer, ez eo dreistpadet staonekadur ar gwenedeg e galleg - poblek - korn-bro Kistreberzh, kollet ar yezh gantañ etre 1800 ha 1850. Evelato e c'heller arguziñ penaos ez eo gwell d'an nevez-kerneveuregerion degemer un distagadur tost d'ar skritur hengounel, evit abegoù a bep seurt moarvat, dreist-holl avat evit aesaat kelennadur ar yezh.

Un dra a vefe da notañ e-keñver emsav ar yezh e Kernev-veur, ez eo levezon ar brezhoneg war ar yezh arnevez a glasker krouiñ : houmañ a zo anat ken er c'heriadurezh ken en ereadurezh ; a-ratozh e striv reizherion ar yezh-se tostaat ar c'herneveureg ouzh ar brezhoneg ; ha kement-se hon eus gallet gwiriañ o lenn abaoe al levrioù kernevek hon eus prenet e Penarth pe e Plymouth.

Anv a oa bet ivez eus istor ar yezh hec'h-unan, eus ar gwallefed war hec'h emdroadur eus implij ar saozneg en ofisoù an Iliz kefridiel ; padal, hiziv an deiz ez eo techet kaer lod kloer eus an Iliz kefridiel-se d'ar yezh kerneveurek ha bep an amzer e vez renet ganto lidadurioù er yezh-se. A-hend-all ne vank ket ar gatoliked vrogar e Kernev-Veur met betek-henn n'hon eus ket munudoù resis diwar-benn se.

\*\*\* \*\*

Noziñ a rae enta p'en doa skoet al lestr war-du ar meurvor. O vezañ ma tleemp sañset treizhañ Mor Breizh diouzh an deiz, ne oa ket bet feurmet fle-

doù evit an noz. Koaniet deomp hor boa klasket diskuizhañ e-barzh 'kadorioù-silwink' met gant ar fresk ma oa an noz n'oa ket bet tu da gousket mat e gwirionez. War-dro peder eur eus ar beure hor boa tizhet aodoù Breizh e Rosgo. Gant Tepod e oan savet e-barzh karr Marsel Blanchard evit adkavout va c'harr-me e Kistinid end-eeun ; alese em boa skoet war-du Roazhon e-lec'h e oan erruet e dibenn ar mintinvezh, skuizh a-walc'h evit lavarout ar wirionez, kaset da benn ganeomp avat ar mennad a oa ganeomp o vont en tu all d'ar mor.

Youenn OLIER

+++++

+++++

+++++

BEAJ "KRISTENION BREIZH" da Iwerzhon e dibenn an hañv.

Aozañ a ra KRISTENION BREIZH, evel boaz, un droiad er broioù keltiek etre ar sul 26 a viz Eost hag ar yaou 6 a viz Gwengolo 1984. Pal ar veaj-se eo startaat an darempredoù etre brogarourion ar broioù keltiek ha, peurgent, etre ar re gristen, dezho da c'hellout kenlabourat tostoc'h ha klokoc'h en amzer-da-zont. Chom a ray enta perzhidi ar veaj a-sav un devezh hag un nozvezh e Kernev-Veur ; un devezh hag un nozvezh e Kembre ; ha goude treuziñ ar mor eus Caergybi da Zulenn e tiskennint betek mervent Iwerzhon, e rannvro Gerri ; eno e tremeno KRISTENION BREIZH un nebeut devezhioù gant Iwerzhoniz ha Kelted all a fello dezho dont ganto, en un ti, dres war ribl ar mor, en un andred sioul ha dizarempred.

Setu bremañ deiziadur ar veaj evit ar re a garfe ambroug KRISTENION BREIZH en o beaj tramor :

Disul 26 Eost : loc'hañ eus Rosgo da 23 eur ;  
Dilun 27 Eost : erruout e Plymouth da 06 eur ;  
Dimeurzh 28 : tro e Kembre ; lestrañ da 16 eur e Caergybi ; degouezhout e Dulenn da 20 eur, d'ar merc'her 29 Eost ; Diriaou 30 Eost : tremen an devezh e Dulenn ha loc'hañ war-du ar C'herri ; tremen ar gwenervezh, ar sadornvezh, ar sulvezh, al lunvezh hag ar meurzhvezh eno ; loc'hañ d'ar merc'her 5 a viz Eost eus ar C'herri evit distreiñ da Vreizh dre Rostlare, Abergwaun, kreisteiz Kembre ;  
diriaou 6 Eost : lestrañ e Plymouth da 08 eur, ha dilestrañ e Rosgo da 15 eur.  
Priz : war-dro 2.000 lur.

Evit kaout diskleriadurioù, skrivañ da sekretouriezh KRISTENION BREIZH : c/o Paol KALVEZ, Lez Hinog, 35 380 Pempont (P.lelan-Vras); pellgomz: (99) 078503  
Tu a zo ivez da ambroug KRISTENION BREIZH en Iwerzhon hepken ; skrivañ bepred da sekretouriezh K.B.

Maoris ar C'HOLLO

Ar misionoù e Breizh  
en amzer Mikael an Noblez  
hag an Tad Maner

(1608-1682)

#### RAKLAVAR

En ur gregiñ gant an displegadenn-mañ eo ret din ho lakaat war evezh penaos n'on bet morse gouestlet d'ar studioù don na gourdonet diouto. Dre-se, arabat e vefe gortoz diganin barregezh un den a vicher war dachenn Istor an Iliz.

N'am eus graet nemet pennaouiñ e-barzh levrioù a dalvoudegezh bet savet e galleg diwar-benn ar Misionoù e Breizh. Koulskoude e tlean anzav em eus silet em studiadenn meur a brederiadenn eus va ferzh va-unan, oc'h en em harpañ avat war ar pezh am eus lennet eus an testennoù deuet betek ennomp war marevezh ar Misionoù meur. Spi am eus, daoust da se, e talvezo va labour muioc'h eget netra, ma soñjer er reuzeudigezh m'emaomp enni e Breizh, diberc'hennet maz eo houmañ, muioc'h-mui, diouti hec'h-unan !  
Divent, koulz lavarout, eo ar c'henn

etre ar bed a-vremañ hag ar bed emacomp  
o vont da eñvoriñ. Ha koulskoude n'eus  
ket anezho daou ved peurestren an eil e-  
keñver egile, ken ez eo kentelius-meurbet  
o zostaat an eil ouzh egile.

+++++

Misionoù Breizh  
en o ampoent

Stuz an Iliz e Bro-C'hall

Ar Misionoù meur e Breizh n'int ket un dra penn-  
-da-benn diouto o-unan. Dre Vro-C'hall a-bezh,  
adalek derou ar seitekvet kantved, ez eus bet  
graet misionoù a bep ment, hep ma vije bet lakaet  
war an aoterioù ar re holl o deus o embreget. E-  
touez ar re vrudetañ eus ar visionerion e kaver :  
sant Yann-Frañsez Regis, sant Yann Eudes (1601-  
1680), sant Visant a Baol (1581-1660).

Ma seller a-ziavaez ouzh an traoù, en ur stuz  
emsavel edo Bro-C'hall a-bezh er XVIIvet kantved,  
a-benn embreger enni misionoù. Petra bennak a vo  
soñjet a-zivout ar brezeliou-diabarzh, ehanet da  
vat e seblantent bezañ. Ar pennadurezhioù, ken re  
ar Geoded, ken re an Iliz, a oa a-du evit ma vefe  
adkatolikaet ar vro : kement den a c'hoantafe ke-  
mer perzh el labour-se a gavfe frankiz ha skoazell.

Met darn eus an eskibion a veize ervat e oa  
bras an ezhom da adkristenaat ur vro hag a oa  
chomet a-hend-all, dre vras, feal d'ar gatoligiezh.  
Gwad nevez a ranke ober an Iliz e Bro-C'hall ! A  
belec'h e teufe al lusk ? A-berzh Doue, da gentañ,  
e ranke dont.

Emelladenn Doue

e Misionoù Breizh

Marteze e fazian, met seblantout a ra din n'eo  
ar wirionez-mañ bet lakaet anat-splann e neb lec'h  
all ebet, muioc'h eget e Breizh. Ar Misionoù meur  
e Breizh a zo bet, a-raok pep tra, un emelladenn  
a-berzh Doue. An embregerion anezho a zo bet diba-  
bet, prientet, heñchet, skoazellet gant Doue, ha  
se en un doare a zo burzhudus penn-da-benn. Diouzh  
an tu all, ar fideled a zo bet sachet daveto en un  
doare ken burzhudus all.

Traoù arouezius a zo ivez : Mikael an Noblez  
genidik eus Plougernev, er c'horn pellañ eus Breizh  
war-du ar c'hornog ; an Tad Maner, genidik eus  
Sant-Jord-Restembaod, etre Felger ha Pontorson, er  
c'horn pellañ eus Breizh war-du ar reter ; ar  
c'hentañ eus tachenn ar brezhoneg ha brezhoneger;  
an eil, eus tachenn ar galleg ha galleger. An eil  
hag egile avat, o tont gouest da labourat, an eil  
war-lerc'h egile, war-dro ar vrezhonegerion hag e  
brezhoneg. Keñveradennoù all : Mikael an Noblez  
eus an noblañs ha pinvidik e diegezh; an Tad Maner  
eus tiegezh dister ur marc'hadour. Mikael an Noblez  
- beleg dieub ha lean c'hwitet o tibab e hent e-  
unan hag o chom e-unan o vont gant e hent ; an Tad  
Maner, enframmet en ur gevredigezh leaned e barr  
- o tastum avat en-dro dezhañ e-leizh a genlabou-  
rerion. Mikael an Noblez o tremen an darn vrasañ  
eus e vuhez-veleg hep kuitaat Douarnenez pe Gonk;  
an Tad Maner, hep ehan e-pad daou vloavezh ha daou  
-ugent, o vont eus an eil parrez d'eben hag eus an  
eil penn d'egile d'ar vro.

Re anat eo e teu an daou zen-se d'en em glokaat  
war dachenn an abostolerezh hag ez int bet sevene-  
rion un oberenn unvan a-us d'o mennad ha d'o gal-  
loud. Re hir e vefe, siwazh, henn diskouez dre ar  
munud.

## Perak Misionoù e Goueled-Breizh er XVIIvet kantved ?

### Dizeskoni ar bobl kristen

Marevezh istorel ar Misionoù e Breizh a grog e 1608, e Montroulez hag en eskopti Treger, gant Mikael an Noblez hag Tad Kintin, hag a echu e 1682, gant diwezhañ mision an Tad Maner e Skrignag.

Perak eo bet degemeret e Breizh mennoz ar misionoù ? E yezh ar gatoliked eus an amzer-se, distagañ ar ger "mision" a oa lakaat da soñjal en un embregadenn e-sell da ginnig, evit ar wech kentañ, Aviel Jezuz Krist e broioù dianaoudek a-grenn anezhañ. Bez' e c'helled c'hoazh soñjal en ur strivadeg evit adc'hounit d'ar feiz katolik tachennoù bet aloubet gant disivouderion, evel ma reas sant Frañsez a Sales e bro Chablez.

Hag ezhomm he doa Breizh eus seurt misionoù ? Nann, ma oa ezhomm enni a visionoù, ne c'helle bezañ nemet ur seurt nevez a visionoù. Penaos edo kont, d'an ampoent, gant ar vuhez kristen e Breizh? Da welout eus an diavaez, n'oa ket fall an traoù, tamm ebet ! Doue, Jezuz Krist hag ar Werc'hez Dinamm a seblante bezañ er gêr gant ar Vretoned, da c'hortoz m'en em ziskouezfe dezho, e 1624, e kichen an Alre, santez Anna. An Iliz katolik a chome diazezet start, gant e eskibion hag a oa, muioc'h-mui, gwir vesaerion o zropell. E pep korn eus ar vro e kaved beleion, tudjentil, bourc'hizion direbech en o feiz hag en o buhezegezh, ha madoberrus. E-touez ar gouerion zoken, an Tad Maner a zizoloio eneoù eus an dibab. E kalz a barrezioù, gwir eo, ne veze ket miret penn-da-benn lezenn arsul: labouret e veze pe gorollet en deiz-se. Met n'henn graed nemet war-lerc'h an oferenn blaen diouzh ar beure ! Hag ar gousperoù a veze c'hoazh darempredet, ken e c'hell Mikael an Noblez, o tegouezhout

e Konkernev, pignat, ur sulvezh, er gador e dibenn ar gousperoù !

Met a-dreñv an doareoù diavaez-se a vuhezketed, pebezh reuzeudigezh ! An Tad Maner, oc'h ober ur mision e Gorre-Kernev, a c'houlenn ouzh ur c'houer kozh pet Doue a zo. "Daouzek ! " a respont hemañ. "Tamm ebet avat!" a zistag neuze ur vaouez kozh en e gichen. "N'eus nemet seizh!" \*

An Tad Boscher, Jezuist, istorour kentañ an Tad Maner, a skriv penaos, e kalz parrezioù eus Goueled Breizh, ez anavezet ken nebeut misterioù ar relijion, ma teued, o kelenn ar gristeniezh, da lakaat enno diazezoù kentañ ar feiz !

Mikael an Noblez, pa ra e dro gentañ e 1615 er C'hab Sizhun, a zizolo brizhkredennoù ha kammvoazioù hag a denn d'ar baganiezh. Da skouer, bep miz, pa skede al loar nevez, edo ar c'hiz da vont d'an daoulin da lavarout ur Bater en hec'h enor, evit kaout un amzer diouzh ezhomm an douaroù.

E 1609, Mikael an Noblez en doa graet ur mision en Eusa ha degemeret mat e oa bet. Daou vloaz ha tregont diwezhatoc'h, koulskoude, e kav an Tad Maner an enezenn e-kreiz ar vrasañ dizeskoni e-keñver ar feiz. Diaes e vije bet kavout enni un dousen a gristenion anaoudek ervat eus misterioù brasañ ar relijion pe eus gourc'hemennoù Doue. Koulskoude e oa du-se ur person ha daou gure, dizek o-unan avat ! Labour kentañ ar visionerion a voe reiñ da Eusaiz ar geleannadurezh o devoa ezhomm.

E 1646, e-pad tri devezh, degouezhet eno war ali start an Eskob, an tad Maner, gant e visionerion a glask, en aner, kregiñ gant ur mision e Sant-Turien : distaolet eo didruez ha stlapet mein outañ gant ar barrezianiz iset gant o Person !

E Douarnenez, war-dro 1620, ar Person, an Aotrou Capitaine, a asant seveniñ ur mennoz kinniget dezhañ gant Mikael an Noblez : divizout ma ranko

an holl tremen un arnodenn a-benn tostaat ouzh ar sakramantoù ! A-benn reiñ an asant-se e ranke ar Person bezañ anavezet fraezh braster an ezhomm.

Evit kompren pegen grevus e oa ar gudenn e ranke teurel pled penaos, evit ar gatoliked, ez eo galvet pep den da vevañ war an douar dalc'hmat e darempred gant Doue. War-bouez ren ur seurt buhez ez eo diarvar e vevo-eñ ivez, goude e varv, gant Doue a-hed ar beurbadelezh. Met a-benn bevañ e darempred dibaouez gant Doue e rank an den degemer ar pezh a zo lavaret ha gourc'hemennet dezhañ evit se gant Doue, ha roet dezhañ da anaout gant an Iliz katolik. An dud kentañ, avat, en Iliz katolik a zo karget eus al labour-mañ eo ar veleion.

#### Kiriegezh ar veleion

Ar veleion end-eeun eo a oa pennabeg d'an truezus a stuz ma oa kouezhet ennañ eskoptioù Goueled-Breizh. N'eus ket gwelloc'h doare da gardarnaat ar wirionez-mañ eget en em harpañ war lavaroù tud atebek hag anaoudek eus an dael.

Er bloavezh 1684, daou vloaz war-lerc'h marv an Tad Maner, an Aotrou Koadlogon, eskob Kemper, a sine kement-mañ en e desteniekadur diwar e benn : "A-raok ar misionoù-mañ, nebut-tre a veleion a brezege hag a rae katekiz em eskopti ; abaoe avat, un niver bras-kenañ, stummet da brezeg dindan e renerezh (hini an Tad Maner) a vez klask warno e pep lec'h ha gant berzh e labouront da c'hounit an eneoù..." (Séj. II, p. 257)

An Tad Le Roux, kendalc'her an Tad Maner, o skrivañ diwar-benn hemañ, a lavar ne veze graet, a-ziaraok dezhañ, koulz lavarout prezegenn ebet er parrezioù diwar ar maez. Ar bobl a veve eno e-kreiz un diouiziegezh kaset lark war misterioù ar relijion, hag en he bleud e seblante-hi bezañ gant se." (Séj. II, p. 66)

Kadarnaet eo kement-mañ gant ar pezh a skrive Mikael an Noblez e Konk, etre 1640 ha 1650, diwar-benn porzh Konk : "N'eus du-mañ kofezour a-zoare na prezege ebet, nemet e-doug ar C'houraiz." ("Displegadurezh a-zibout disprizerezh ar bed" kv. Séj. I. p. 95) Gant an testeni-mañ e teskomp na oa deuet gwellaenn ebet, war ar poent-se, e-doug an daou-ugent vloaz ma oa bet Mikael war an dachenn ha na rae, dre se, an droug nemet gwashaat.

A-walc'h hon eus gant an testeniou-mañ da ober an dro da hemañ. Graet e oa gant an diouer a brezegerezh, a gatekizerezh hag a gofezerezh, ha gant an diouiziegezh war draoù ar feiz hag an digristenidigezh o teverañ eus an diouer-se e-touez ar boblañs, dreist-holl, evel a welimp, e-touez ar vazidi.

Un diaester muioc'h :  
kudenn ar yezh

Met a-raok degas a-wel pennabeg don ar fallaenn deuet war ar veleion, eo ret merkañ an diaester a washae c'hoazh gwall alies ar fallaenn-se. Er studioù tostañ dimp bet graet war ar misionoù e Breizh ne vez ket pouezet kalz - pa vez graet! - war an diaester-se. Ha koulskoude n'eo ket testeniou a-gozh a ra diouer dimp a-benn e vuzuliañ. An diaester-se eo an dianaoudegezh eus ar brezhoneg, dianaoudegezh o noazout da gentañ ouzh ar Bersoned dre maz eo warno e poueze an atebeged da ginnig d'o farrezioù diorroadurezh hervez an Aviel.

E levr gallek an Tad Séjourné o tibunañ, diouzh an istorourion gentañ, istor an Tad Maner, e kaver meneget diwar-benn un toullad misionoù "ne c'hell ket ar Person ober a-zoare e labour, dre na oar ket a vrezhoneg." P'emañ ar Misionoù war-nes loc'hañ gant an Tad Maner, ne c'heller reiñ dezhañ da gen-eil, hervez reolennoù ar Gompagnenez, nemet an Tad



Bernard, anezhañ ur Breizhad eus Roazhon, met di-  
zesk a-grenn war ar brezhoneg. Barrekaat a c'hello  
evelkent, ha misionaouiñ a raio betek e varv, e-pad  
daouzek vloaz, gant an Tad Maner. Met, da c'houde,  
e ranko hemañ chom hep keneil gwirion e-pad pevar-  
zek vloaz, daoust d'ar preder kemeret e Roma, gant  
Pennrenerion ar Gompagnunez, evit diskoulmañ ar  
gudenn ! An Tad Verjus, hag a skrivas buhez Mikael  
an Noblez pevarzek vloaz war-lerc'h marv hemañ, a  
verk dimp anat en doa Mikael an emskiant eus ar  
gudenn-se hag e klaske he diskoulmañ. Dibunañ 'ra  
an istorour penaos e teuas a-benn da lakaat ur  
Person vertuzus, an Ao. de la Coste, Person Ploñger,  
harp ouzh Konk, da zeskiñ brezhoneg, evit ober  
penn-da-benn dleadoù e garg. An anaoudegezh a zas-  
tumas eus hor yezh a voe talvoudus-bras dezhañ,  
n'eo ket hepken en e barrez, met c'hoazh, diwezha-  
toc'h, pa voe lakaet da arc'hdiagon Leon. Mikael  
a glaskas gounit beleion all a-ziwar-dro, met  
c'hwhitañ 'reas a-grenn. Kentel a c'heller tennañ  
a gement-mañ war dachenn istor ar brezhoneg.

#### Krinadurezh-ene an dud a Iliz

Met war dachenn istor ar Misionoù e Breizh e  
c'hellomp kompren kement-mañ : ur speurenn a oa  
etre un niver bras, marteze an darn vuiañ, eus ar  
veleion hag ar boblañs a vrezhonegerion m'eo doa da  
ober war o zro. Evit ar veleion dichal e-keñver an  
dleadoù da brezeg, d'ober katekiz ha da gofez a-  
zoare, ar speurenn-se a oa, hep mar, un digarez :  
"Peogwir n'ouzon ket a vrezhoneg ez on diskarg di-  
ouzh va dlead." Evit ar re avat o deveze, e-keñver  
Jezuz Krist hag e Iliz, ar garantez a zere ouzh ur  
beleg, e oa an diouiziegezh-se war ar brezhoneg ur  
skoilh ret dont a-benn anezhañ, kousto pe gousto.  
Setu dres ar mennoz a vroudas Person Ploñger ha  
muioc'h-mui a veleion, dre maz ae ar Misionoù war-

raok.

#### An diouer a veleion stummet ervat

Evel a welomp, ar vuhez kristen, el lodenn vrezho-  
nek eus Breizh, a oa e riskl da vont penn-da-benn  
d'an traoñ, dre ziouer a brezegerezh, a gatekizerezh  
hag a implij reizh eus ar sakramantoù. M'edo kont  
evel-se, n'eo ket diwar ziouer a veleion; en enep,  
kalz re a oa anezho, en ur varn diouzh ar pezh a  
c'hellent pe a asantent ober. Hollsened Trento en  
doa meizet ervat na oa diskoulm ebet da enkadenn  
an Iliz, keit ha na vefe ket kavet an tu da stummañ  
beleion a-zoare, hag e-sell a-se eo en doa divizet  
ma vefe savet kloerdiou. Breizh a zeuas da gaout  
he re dres en amzer an Tad Maner : Sant-Malo da  
gentañ e 1643, Roazhon da ziwezhañ, e 1670.

E-pad e studioù e Bourdel en doa Mikael an No-  
blez prederiet a-zevri war mennoz ar velegiezh  
kristen. Meizet en doa petra 'rae diouer da veleion  
e amzer. Sebezus eo al lizher a lezas gant studie-  
rion kêr Ajen - tri bloaz warn-ugent ne oa ken -  
p'o c'huitaas evit boulc'hañ, e Bourdel, e studioù  
war an deologiezh. Evit ar re a soñj er velegiezh  
eo e skriv ; komz a ra a-zivout "ar striv evit  
gounit ar vertuzioù hag evit dastum deskadurezh,  
daou dra," emezañ, "ret o c'haout da vinistr Doue,  
rak ar ouiziegezh hec'h-unan-penn, hep ar furnez  
eus an nec'h, n'eo ket a-walc'h... M'hoc'h an evu-  
rusted da gaout gouiziegezh, arabat deoc'h emellout  
e renerezh an eneoù hag e gouarnamant an Iliz a-  
barzh bezañ gounezet ar furnez eus an nec'h, dre  
entread disprizerezh ar bed... Evel ma vez skarzhet  
ar c'hwervoni dre ar spurjadur, en hevelep giz eo  
ret spurjañ an ene diouzh tro-spered ar bed dre ar  
furnez eus an nec'h, hag a ra fae war draoù an  
izelved-mañ, evit en em stagañ ouzh an anaoudegezh  
sasun ha karantezus eus ar C'hrouer (Sapientia :

eus "sapere" o talvezout "kaout blaz gant"). Diwar z'fouer eus ar furnez-se a-berzh Doue eo ez eus kement a dud a Iliz gouiziek ha na ouzont na katekizañ na bleniañ an eneoù etrezek ar mad, en em gompertiñ e-touez tud ar bed hervez tro-spered disprizerezh ar bed, ken e c'hoarvez ganto bezañ touellet en o soñjoù ha mont eus an eil temptadur d'egile ha bevañ reuzeudik, evito da soñjal ez int gouiziek."


Kement-mañ n'eo nemet un tañva dister eus ul lizher hag a zo ur bravig speredel hep e bar...hag ur gentel talvoudusoc'h c'hoazh, marteze, d'ar veleion a-vremañ eget d'ar re a-ziagent.

E derou ar XVIIvet kantved ne gave mui ar veleion e bro ar brezhoneg, eta, blaz gant Doue ha gant an traoù a sell ouzh Doue, ha ne oant mui gouest d'e garout a-walc'h evit seveniñ, daoust da bep tra, dleadoù o stad, - da lavarout eo, lakaat Jezuz Krist da vezañ karet en-dro dezho. Eno edo gwrizienn an droug : krinadurezh-ene ar veleion ouiziek, ur c'halz anezho doktored eus ar "Sorbonne".

Pa ouezer ervat an holl vennoziou-se ne vezer ket souezhet ma voe nebeut a dud a Iliz, d'an ampoent, o veizañ braster an ezhom a visionoù dre Vreizh a-bezh. Koulskoude e c'helled kavout parrezioù diskennet war live ar baganiezh, evel an hini a voe graet mision enni e 1659 : an darn vuiañ eus an dud ne ouient ket ez eus un Doue hag ur Jezuz Krist ; mennoz ebet n'o devoa eus ar vuhezgezh. Ha war ar marc'had o devoa kavet ur beleg da reiñ dezho dagrediñ e oa sorserion eus ar visionerion!  
(Séj.II,p.10)

+++++

Steuenn-vuhez  
ar visionerion



Mikael an Noblez hervez H. Dikelou.

Bremañ e c'hellomp dibunañ, dre vras, ar fedoù a c'hoarvezas e buhez hon daou visioner ha diwar o oberiantiz abostolel.

Mikael an Noblez (1577-1652)

Da geñver Gouel-Mikael 1577 e voe ganet, e maner Kerouderne (distaget bremañ "Kilouderne"), e Plougerne, Mikael an Noblez, eus Herve ha Frañseza Lezgwern, o-daou eus an noblañs rik. Unnek a vugale o devoe : pemp paotr ha c'hwec'h merc'h. Div eus ar re-mañ, Anna ha Marc'harid dreist-holl, o devoe perzh e labour o breur beleg. Mikael a voe ar pevar eus ar vugale. Herve an Noblez a oa unan eus ar pevar noter roueel a oa en eskopti Leon d'ar mare-se. E binvidigezh a roas an tu dezhañ da bourchas d'e baotred un deskadurezh a-zoare.

D'e seizh vloaz ez eo kaset Mikael da vaner Lezgwern, e Sant-Fregan, e-lec'h ma kav daou veleg, an eil war-lerc'h egile, da reiñ dezhañ o c'hentelioù. Da c'houde ez eo skoliet gant daou vreur beleion en ur chapel war ribl an Aber-Ac'h, war douar Plougerne. D'e drizek vloaz ez eo kaset da Blouzeniel ha fiziet en is-kure Tremaouezan. C'hwec'h vloaz e chom eno da studiañ an hensevenadurioù.

Ar pennad-amzer-mañ a zo a-bouez-dreist en e vuhez. Neuze eo e tizh endeo ar c'hempouez etre an darempred gant an deskadurezh hag an darempred gant Doue, ur c'hempouez hag a raio anezhañ ur skouer eus ar stumm-belegiezh a glaske an Iliz end-eeun lakaat da vleuniañ dre sevel kloerdioù.

Ken diastal eo e zarempred gant Doue, ma plij gant Jezuz Krist e-unan en em ziskouez dezhañ dindan stumm e zenelezh, evel m'en deus Mikael e-unan henn diskuliet d'an Tad Maner : ur c'hras sabatuus e-keñver ur gwaz eus an oad-se !

D'e naontek vloaz ez a Mikael dre vor da skol-

veur Bourdel ; bloaz a dremen e kelenndi Guienne. Kenderc'hel a ranko e studi, e-pad tri bloavezh all, e kelenndi ar Jezuisted en Ajen. Eno, en ur studiañ ar brederouriezh, e ra anaoudegezh gant Pêr Kintin, genidik eus Plouyann; an hini a skoa-zello anezhañ en e visionoù kentañ. E dibenn e studioù en Ajen, ar Werc'hez Vari en em ziskouez dezhañ hag a bromet dezhañ teir c'hurunenn : an hini a werc'hded, an hini a zoktor hag a vlenier er vuhez speredel, an hini a zisprizerezh ar bed, sevenet e stad a vuhez ur beleg bedat (saecularis). Kaset da benn gantañ studi ar brederouriezh e ra ur birc'hirinadenn betek Tolosa, e-lec'h ma tiviz da-vat mont war-du ar velegiezh.

Er bloaz 1600 e tistro da Vourdel evit studiañ an deologiezh e kelenndi ar Vadalen, renet gant ar Jezuisted. C'hwec'h vloaz e pado ar studioù-mañ. Bez' ez eo Mikael, d'an ampoent, unan eus ar re heverkañ eus ar studierion. Anaoudegezh a ra gant Ronan al Loued, eus Loperc'hed, hag a vo diwezhatoc'h eskob Kernev ha skoazeller kentañ an Tad Maner. An Aotrou Al Loued a zisklerie e ouie Mikael dindan eñvor ar Bibl en e bezh e gresianeg! Met e studioù ne reont gaou ebet ouzh e gresk e-keñver ar vuhez speredel. Un dra a-bouez-bras, e sell eus an amzer-da-zont, eo an abadennoù katekizerezh aozet ha renet gantañ, - skoazellet eo gant Pêr Kintin - e Bourdel ha tro-war-dro.

E dibenn ar bloaz 1606 e tistro Mikael da Gêroudern. Dre bediñ hag en em wanañ, met ivez dre brederiañ en em brient d'ar velegiezh. Neuze eo e tarz, 'etrezañ hag e dad, ur gwall grogad : hemañ o klask e lakaat da zegemer digant eskob Leon, an Aotrou Rolland de Neufville, ul leve-iliz, gant ur garg pastorel a-zoare ; Mikael o nac'hañ a-grenn, en ur lakaat da bennabeg "n'en devoa na barregezh na galvedigezh diouzh seurt stumm-buhez." Argaset eus ar gêr gant e dad e tremen e ti e vagerez kozh

c'hwec'h mizvezh hag o deus talvezet ur retred. Neuze e c'houlenn aotre e dad da vont da Bariz, war zigarez studiañ er Sorbonne, met ivez evit kaout an tu da glask alioù talvoudek. Aliet gant an Tad Cotton, kofezour ar peyare Herri, e tibab ren buhez ur beleg digarg hag e resev ar velegiezh e Pariz e 1607, d'e dregont vloaz.

Distro da Vreizh e laka Mikael sevel dezhañ e-unan, e Tremenac'h, a-dal d'ar mor bras, ul lochemn o talvezout da beniti, e-lec'h ma chom karc'hariet tost da vloaz, oc'h en em brientiñ a-zevri d'ur stumm nevez a abostolêrezh.

Kregiñ a ra neuze gant e erv e Plougernev endeeun. Sevel a ra an holl en e enep ha forbannet eo da-vat eus ar gêr ha lamet digantañ e wir d'an hêrezh. Dont a ra a-benn evelkent da zistreiñ e dad hag e vamm diouzh o aheurtadur, a-raok mont da Vontroulez da gavout Per Kintin, deuet da vezañ dominikad er gêr-se. War ali hemañ e teu Mikael da vezañ nevezriad en e gouent. Met hep dale eo stlapet er-maez, diwar vezañ lezet kabestr gant e gounnar ha lakaet a dammou poltred un dimezell ispilhet a-us d'he bez er gouent !

Distroet neuze da Gêroudern e pled Mikael gant e c'hoar Anna ; reiñ a ra dezhi ur reolenn a vuhez hag he lakaat da vevañ e bourc'h Plougernev. Kregiñ a ra ivez da vleniañ Marc'harid en he buhez speredel ha d'he lakaat d'e skoazellañ war-eeun. Evit gwir, ur blenier-ene poellek-meurbet e voe Mikael an Noblez. Pourchas a ra dezhañ e-unan ur repu e Lokrist. Ha neuze e tistro da Vontroulez en ur zegas gantañ e c'hoar Marc'harid. Aotreet gant eskob Treger ha kavet gantañ skoazell an Tad Kintin e krog da visionaouiñ en e c'hiz, e Montroulez ha tro-war-dro. Lakaat a ra da gemmañ-buhez un dimezell, merc'h d'un denjentil a vro-Dreger, Frañseza Gizidig ("Gêrzidig") : o vezañ he c'havet troet-kenañ gant traoù ar bed e ra anezhi ul lea-

nez e-kreiz ar bed hag ur skoazellerez divrud d'e abostolerezh. E 1611 e kuita da-vat Montroulez, met a-ziaraok en do graet misionoù en Eusa hag e Molenez.

Eus Montroulez ez a Mikael da enez Vaz. Ac'hano e teu da Lokrist d'ober e annez hag e krog da labourat e Konk-Leon, unan eus ar porzhioù-mor brasañ e Breizh d'an ampoent. Lakaat a ra e c'hoar da zistreiñ d'e gichen, eus Montroulez. A-barzh nebeut e sav an holl e Konk-Leon hag e Lokrist en e enep ken e c'hoarvez gantañ bezañ sachet d'an traoñ eus ar gador, war urzh ar Person, gant unan eus kureed hemañ, e-keit ha ma sav tabut diwar e benn e-barzh an iliz !

Ar vikel-vras a zo war-nes lemel digantañ pep aotre, pa resev ul lizher e-lec'h ma lenner kement-mañ : "Gouzout a rit, Aotrou, e pe stad o deus an naonegezh-ene hag an diouer eus ar bara maz eo Komz Doue lakaet ar c'horn-mañ pellañ eus Europa. An darn vuiañ eus Personed ar parrezioù ne gredont ket e vije war roll o c'harg lodennañ ar bara-se hag ar Brezegerion a sav en hor c'hadorioù-lid a ra prezennoù e-lec'h ma chom an holl selaouerion gwitibunan hep kompren mann : gwell eo ganto chom hep lavarout netra talvoudus d'hon tud eget lavarout tra pe dra da zisplijout dezho e-ser o c'heleñ ; hag o vezañ maz eo ar berzh a reont en o c'hestoù ar muzul d'o gred, ez eont a-du gant drougoù n'int ket evit parañ, hep krennañ war an tamm gounid douarel a c'hortozont evit o labour. En doare-se ez eus un niver peuzdivent a eneoù o vont da goll, dre ma ra diouer dezho tud barrek ha dic'hoantek, evit o c'heleñ hag o atizañ, ha dreist-holl diwar ziouerout an tu da gaout kofezourion, da c'hellout dizoleiñ dezho, gant pep fiziañs, stad o c'houstiañs ; an diaoul, ar vevzh hag an enkrez a ra dezho mirout serr o genoù..."

Ar vikel-vras a zeu war-dreñv. Tamm-ha-tamm e

c'hounez Mikael un tamm tachenn. Skoazellet gant un intañvez a zo anvet Frañseza Troadeg, barrek da dresañ kartennoù-merdeñ, e laka war ar stern e Daolenoù kentañ. Daoust da bep tra ne ra ket berzh e Konk-Leon. Hag er bloaz 1613 ez a da brezeg da Landernev. Eno, evit ar wech kentañ, e ra implij eus e Daolenoù. Evitañ da vezañ skoazellet gant an Tad Kintin, berzh ebet ne ra.

Neuze e c'houlenn aotre da vont da visionaouiñ e Kernev.

#### Mikael e Kernev

Kavout a ra lojeiz e Kemper, e-lec'h m'en em laka da brezeg ha, dreist-holl, d'ober katekiz. Da ober war-dro ar merc'hed e laka da zont, eus Lokmaze, e c'hoar Marc'harid ha Frañseza Troadeg. Met ne zale ket an holl da vont a-enep dezhañ ha da ober anezhañ "ar beleg foll". Gounit a ra koulskoude un nebeudig tud ha dreist-holl, ur beleg deol hag a zo kemeret gantañ da gofezour. E vision kentañ e Kernev eo hini ar Faou, e 1615. A-greiz ar mision-mañ e rank mont da Gêrouder war-dro e vamm war he zremenvan (e dad a oa marvet tri bloaz a oa). Adkregiñ a ra gant e labour e Konk-Kernev; amañ e c'hoarvez gantañ ur c'hwitadenn rik.

Mont a ra da Bont 'n Abad : eno ez eo selaouet gwelloc'h. O vezañ tremenet dre Enez-Tudi ez a da Waien. A-vec'h ez eo pignet er gador, e dibenn an oferenn, ez a an holl wazed er-maez, ha ne chom d'e selaou nemet un toulladig merc'hed ; gloazet-bras eo gant se, en e galon hag en e yec'hed.

Hep ma ouijed perak; eskob Kemper, nevez degouezet war e dachenn, a laka Mikael da asantiñ bezañ anvet da Berson e Melar, ur barrez eus an dibab d'an ampoent. Ne c'hell ket padout pell eno, ha d'an 22 a viz c'hwevrer 1617 e tegouezh e Ploare. Degemeret mat gant ar Person, an Aotrou Capi-

taine, e ra e ziazez eporzh Douarnenez. Daou vloaz warn-ugent e chomo eno (daou pe dri warn-ugent).

Daoust d'an enebiezh a c'hoarvez, er penn-kentañ, en e enep, e teu a-benn da c'hounit tud a hiniennoù. Gounit a ra zoken war ar Person ma vefe rediet an holl barrezianiz da dremen un arnodenn, a-barzh kofez, komunian ha bezañ euredet. Kelenn a ra an dud a-benn an arnodenn-se, gant skoazell e c'hoar Marc'harid, hag a zeu da Zouarnenez adalek 1619. A-hend-all, e labour-beleg a zo graet diwar ar prezegerezh, ar c'hatekizerezh, ar stummañ disklerierezed-taolenoù, ha diwar ar bleniañ-eneoù.

Ar re binvidikañ eus ar barrez a ra prosez outañ, en aner avat, dirak barner eskobel Kernev. Ar person a zo a-du gantañ. Met e 1625 emañ trenket an traoù da-vat etre an daou veleg, betek ma kaser klemm a-enep Mikael, war zigarez ma ra implij eus merc'hed da ober katekiz ha da zisklerian an taolenoù. En taol-mañ adarre ez a ar Vikel-Vrasbarner a-du gant Mikael ha kompezañ a ra an traoù etrezañ hag ar Person.

E 1631 e tarzh etrezo ur gwir vrezel, ken e kav mat Mikael en em repuiñ ur pennad e Poull-Dahud. N'ouzomp ket pegeit e chom eno na penaos e teu kalmijenn. Met e 1634 emañ ar Person a-du, dre anaoudegezh-vat, da aotren da Vikael ur plas evit e vez en iliz Ploare.

Er bloaz 1634 e lez ar Person e barrez gant Herri Gwegenou, e niz. Gant o harp dezho o-daou e teuer a-benn en taol-mañ da lakaat ar Vikel-Vras da argas Mikael eus eskopti Kernev dre ar skrid-mañ : "Aotrou, penn-da-benn ho puhez hoc'h eus prezeget ar sentidigezh d'ar re all ; sevenit-hi bremañ hoc'h-unan ; distroit da eskopti Leon ez oc'h genidik anezhañ, ha na zistroit biken da hini Kernev!"

Mikael e Konk-Leon

Deuet d'e dri bloaz ha tri-ugent e tegouezh Mikael dre vor e Konk, e-lec'h ma tremeno ar peur-rest eus e vuhez.

Er penn-kentañ e c'hell c'hoazh lavigañ met ne zale ket da rankout chom er gêr, war-c'hed avat da zegemer kement hini a zeu d'e gavout. Darempredet e vez e damm ti gant beleion, met ivez gant ur genlabourez war ar c'hatekizerezh hag an disklerian-taolenoù: Jan ar Gall, eus Lokronañ-Leon, ur plac'h bloaz warn-ugent ha na ouie nemet kas an alar. Gant kalz a boan, ha war-bouez he c'has da Zouarnenez d'en em stummañ, e teu a-benn da ober anezhi ur gatekizerezh hag a sabatuo Vikel-Vras Leon, hec'h arnodenner.

E-doug e dreuz war douar Konk-Leon e 1640 e resev Mikael an Tad Maner o vont da gregiñ gant e erv ; meur a wech e resevo anezhañ.

Met degemer a ra ivez tud all, en o zouez an dud-a-vor.

E dibenn gwengolo 1651 en deus un taol-gwad hag ez eo skoet gant ar peluz, ken e chom, e-doug seizh miz, e stuz ur c'hrouadurig, o kemer perzh evel-se - evel m'en doa goulennet - e bugaleaj hor Salver. Kemer a ra perzh ivez en e Basion, dre vezañ gwallgaset didruez gant an droukspered. Daou varrad all eus e gleñved a c'hoarvez gantañ ha mervel a ra, an Tad Maner war e dro, d'ar 5vet a viz Mae 1652, en e bemzek vloaz ha tri-ugent. En iliz Lokrist e voe e vez da gantañ ; met an iliz-mañ a zo bet dezouget da Konk-Leon ha deuet eo ar bez war-lerc'h an iliz.

~~~~~

~~~~~

\*\*\* \*\*

An Den-Evurus Juluan Maner

(1606-1683)

War hent ar velegiezh

Bloaz a-raok belegidigezh Mikael an Noblez ez eo ganet Julian Maner, - ez resis d'ar c'hentañ a viz Here 1606, e Sant-Jord-Restembaod, en eskopti Roazhon, war harzoù an Normandi. E dad, Izaag, a zo ur marc'hadour dister ; e vamm a zo hec'h anv Gabriela Doloris ; o-daou int tud a feiz hag a ouestl o mab d'an Iliz, kerkent ha badezet.


Unan eus beleion ar barrez a ro dezhañ e gentelioù kentañ war al latin. D' e bemzek vloaz ez eo kaset da Gelenndi ar Jezuisted e Roazhon.

D'e naontek vloaz emañ neveziad-jezuist e Sant-German Pariz. Daou vloaz war-lerc'h e krog gant studi ar brederouriezh e "La Flèche".

E 1630 ez eo kaset, e-giz kelenner, da Gemper, e-lec'h m'eo diazezet ar Jezuisted dek vloaz a zo. Eno e ra anaoudegezh gant an Tad Breizhad-Brezhoneger Gwilherm Thomas ha gant an Tad roazhonat Pêr Bernard, bloaz warn-ugent koshoc'h egetañ ; hemañ, anaoudek eus reuzeudigezh relijiel e vro, a gemer levezon war Julian Maner hag a boulz anezhañ da zeskiñ brezhoneg. Met spered Julian a zo kentoc'h gant Misionoù ar C'hanada.

En hevelep bloavezh, eus Douarnenez, Mikael an Noblez, sklerijennet eus an neñv, a ya da Gemper da welout Julian Maner, hag a zistro d'ar gêr hep bezañ lavaret da hemañ netra diwar-benn ratozh Doue.

Un nebeut devezhiou war-lerc'h, Julian Maner, en ur vont da chapel Ti Mamm Doue e parrez Kuzon (bremañ Kêrfeunteun), a soñj e stad an Iliz e Breizh hag a zo gounezet gant ar c'hoant hag ar spi da zeskiñ brezhoneg. Degouezhet er chapel e



Am Tad Julian Maner hervez H. Dikelou

ped an Itron Varia da zeskiñ hec'h-unan dezhañ ar yezh-mañ.

Met nac'het eo outañ an aotre d'he deskiñ. C'hwec'h miz diwezhatoc'h, a-drugarez-Doue, e resev an aotre-mañ digant an Tad Proviñsat, dres da Sul ar Pantekost. D'ar meurzh war-lerc'h e ra katekiz d'an dud e brezhoneg ; c'hwec'h sizhun goude en em laka da brezeg er yezh-se, hep kaout ezhomm da skrivañ en a-raok, hervez an testi a zoug e-unan.

Tizhet en e yec'hed, ez eo kaset, e 1633, da dTours, e-lec'h ma ra katekiz ha ma teu da bareañ.

E 1634 ez eo kaset da Vourjez, da studiañ an deologiezh. E-kreiz e studioù ez eo gounezet, muioch eget biskoazh, gant ar c'hoant da vont d'ar C'hana-da.

E 1636 e kouezh klañv da vervel. A-daol-trumm e teu neuze ar soñj dezhañ da c'houlenn ar pare hag e ra al le, ma teu da bareañ, da ouestlañ ar peurrest eus e vuhez da silvidigezh Breizh. Ne zale ket ar pare da zont dezhañ.

D'ar 6vet a viz mezheven 1637, da Sul an Dreinded, ez eo beleget.

#### Dael war gudenn ar Misionoù

Er bloaz war-lerc'h ez eo kaset da Nevers, e-lec'h da Vreizh.

Rak diaesterioù a zo, pa vez graet meneg eus misionoù e Breizh, daou dreist-holl. An hini gwashañ eo enebiezh an Aotrou Gwilherm ar Beleg a Lezoned, eskob Kernev (1614-1640). "Perak misionoù em eskopti ? " emezañ, "n'am eus ket ennañ a hugunoded!" Sevel a ra zoken un deved a-enep ar misionoù. Ahend-all, hervez ar reolennoù ar Gompagnunez, e vefe ret reiñ d'an Tad Maner ur c'heneil eus e Urzh. An Tad Bernard, dezhañ tri bloaz hag hanterkant ha dizesk war ar brezhoneg, n'emañ ket e-tailh da gemer ar garg-se.



E 1639 ez a an Tad Maner da Rouen, da beurechuiñ e stummidigezh. met a-ziaraok, eus Roma, e ro Pennrener ar Gompagnunez, aotre da seveniñ al le bet graet gantañ e Bourjez.

E 1640 e tegouezh an Tad Maner e Kemper, e-lec'h ma kav dirazañ enebiezh an eskob Mikael an Noblez, repuget e Konk, a c'halv an Tad davetañ. Baleet gantañ un devezh-pad e klev Julian keloù eus marvidigezh eskob Kemper.

Fromus eo ar gejadenn etre ar Misioner kozh hag an hini nevez. Hemañ a grog gant e labour e Konk-Leon, dirak Mikael an Noblez. Hemañ a ro ali d'an Tad Bernard da asantiñ, daoust da bep tra, mont da geneil gant an Tad Maner. An Tad Bernard a ro e asant hag a resev aotreadur ar Pennrener. E-keit-se e klask Markiz Rozmadeg, gouarnour Kemper, harp Richelieu ; hag hemañ a gemer war e gont mizoù ar pevar mision kentañ. E-pad m'emañ an Tad Bernard a-zevri gant studi ar brezhoneg ez eo anvet da eskob e Kemper an Aotrou Ronan Al Loued a Goadyunval, Kaner-Meur iliz-eskob Kastell-Pol. An eskob nevez, bet skoliet gant ar Jezuisted ha kenstudier da Vikael an Noblez e Bourdel, n'en deus ket brasoc'h c'hoant eget bezañ skoazellet gant ar Misionoù.

#### Sell diwar-nij ouzh Misionoù an Tad Maner

Daou vloavezh ha daou-ugent a vo gouestlet dezho gant an Tad Maner, - betek e varv - ha gant Douarnenez eo e krogo.

Niveriñ a c'heller etre 325 ha 375 mision (an dielloù n'int ket klok na peurrezis), anezho ouzh-penn an div drederenn bet graet en eskopti Kernev, 18 gouestlet da Zouarnenez hepken. Eus an eskoptioù all, ar re a resevas an aliesañ an Tad Maner a voe re Leon (26 mision) ; Treger (26 mision) ; da

c'houde, Gwened (14), Roazhon (14), Sant-Brieg (12) ha Dol (7). Sant-Malo ha Naoned a chom e-biou (an niveroù diouzh levr Séjourné).

Dastum a ran amañ ar fedoù pouezusañ a-ziavaez c'hoarvezet e-doug ar marevezh-se.

1641 : an Tad Maner a c'hounez aotre da visionaouiñ en eskopti Leon ; anaoudegezh a ra gant Katell Danieloù, eus Kemper, pinijennourez a-youl-vat ; kavout a ra en Enez-Sizhun danvez ur person evit an enezenn : Frañsez ar Su, diskibl da Vikael an Noblez.

1643 : an Tad Maner a ra anaoudegezh gant Mari-Amis Picard, eus Gwiklan, o vevañ e Kastell-Pol, pinijennourez evel Katell Danieloù.

1644 : e-doug Mision Irvilhag e tegouezh an Tad Maner gant ur mesaer a ugent vloaz, bet lubanet gant an droukspered hag en em ouestlet dezhañ.

1646 : an Tad Maner a ya etrezek penn pellañ eskopti Kernev diouzh tu ar reter, e korn-bro Mur ; e-pad tri devezh e klask en aner kregiñ gant ur Mision e Sant-Turien.

1649 : Person Botoa a glask reiñ lamm d'ar Misionoù dre lakaat o droukvarn er Sorbonne ; c'hwitet gantañ war e daol e c'halv eskob Kernev dirak Parlamant Breizh, e-lec'h ma vez c'hoarzhzet ouzh ar Person aheurtet.

E dibenn ar bloaz, e Sant-Gwenn, trev eus Mur, e tizolo an Tad azeulerezh an Droukspered, anvet gantañ "Droug ar Menez". Diwar-benn an doare aozet gantañ da stourm ouzh an droug-se e krog un tabut ha na vo sioulaet da-vat (ha c'hoazh!) nemet e 1658 - hag ar gwir a va lakaet penn-da-benn gant an Tad Maner.

1651 : e chapel sant Elouan, e parrez Mur, eo diazezet gant an Tad Maner kevredad ar veleion visiонерion - gant ar re gentañ eus ar re-mañ, an Aotrou Galer, Person Mur ; niver an izili a yelo

buan betek tri-c'hant ha diwezhatoc'h, betek ar miliad ! Un dekvedenn bennak eus niver ar veleion d'an ampoent ! Hemañ eo an taol-berzh pouezusañ eus oberenn ar Misionoù en he fezh.

1652 : marvidigezh Mikael an Noblez.

1654 : marvidigezh an Tad Bernard.

1655 : kemmadenn-vuhez Aotrou Trevaria, denjentil eus ar C'hab Sizhun.

1656 : Aotrou Trevaria, bet beleget, o kemer perzh e labour ar Misionoù.

1657 : nevezinti gant an Tad Maner a ijin "chapeled bihan ar Werc'hez", anezhañ ar Gredo, ar Bater, lavaret teir gwech, ha daouzek Ave, o klotañ gant daouzek donezon-dreist ar Werc'hez.

1658 : doare-ober an Tad Maner e kofezerezh an emouestlidi d'an Droukspered a zo kavet mat e Pariz hag aotreet gant eskob Treger.

1659 : an Tad Anton Poncet, eus Pariz, en em ginig da skoazellañ an Tad Maner hag en em lak da zeskiñ brezhoneg.

1660 : an Tad Poncet a zistro da Amerika ; an Tad Roparzh Jacquesson a gemer e blas, desket gantañ un tamm brezhoneg.

1663 : ur chapel da Sant Mikael a zo savet e Douarnenez, war dachenn ti Mikael an Noblez.

1667 : evit ar wech kentañ e laka an Tad Maner neveziñ Promesaoù ar Vadeziant e-doug ar Misionoù ; degas a ra ivez ar boaz da ober lid an embrientiñ d'ar gomuniadeg.

1668 : marvidigezh an Aotrou Al Loued, eskob Kernev, Aotrou Koadlogon a zeu da gemer e lec'h ; an Tad Visant Martin, Breizhad ha brezhoneger, daou-ugent vloaz, a zo roet da-vat da geneil d'an Tad Maner.

1670 : war atiz an Tad Maner ez eo digoret e Kemper an Ti a Retred evit an holl seurtoù-tud.

1674 : marvidigezh Aotrou Trevaria.

1675 : Emziskouezadsenn ar Werc'hez, gant Mikael

an Noblez en he c'hichen, d'an Tad Maner, e chapel Itron Varia Gonforz.

Emsavadegoù ar Bonedoù Ruz (Treger) hag ar Bonedoù Glas (Kernev) a-enep an tailhoù direizh divizet gant Pariz ; an Tad Maner a ya da heul dug Chaulnes dre eskoptioù Treger ha Kernev, o seveniñ e gefridi a veleg war-dro an emsavid.

1676 : kemmadenn-vuhez Aotrou Kerizag ; Markiz Pontkalleg ivez a dro kein d'ar bed ;

1677 : beleget o-daou e kemeront perzh e labour ar Misionoù ; an Tad Maner a laka da-vat retredoù e framm ar Misionoù.

1678 : e mision Lambaol, eskopti Sant-Brieg, e teu an Aotrou 'Leuduger (pe 'Leuduger'), Diazeour da-vezañ 'Merc'hed ar Spered Santel', da skoazellañ an Tad Maner ; neuze e oa Person Plouwinaz ; marvidigezh Aotrou Kerizag ; marvidigezh an Aotrou Grangier, eskob Treger.

1682 : an daou vision diwezhañ graet gant an Tad Maner eohini Plounevezel hag hini Skrignag ; en houmañ ne c'hell ket labourat betek penn ; e Plougernevel e ra e brezegenn hag e gatekizadenn diwezhañ.

1683 : kouezhet klañv-bras e presbital Plevin, e varv an Tad Maner eno, d'an 28vet a viz Genver (tri-c'hant vloaz a zo bet).

Taol-berzh diwezhañ an Tad Maner : poulzet gantañ, an Tad de Dumaine, hag en doa roet dezhañ ar sakramantoù diwezhañ, a grog gant studi ar brezhoneg hag a zeu da vezañ, betek e varv e 1691, keneil an Tad V. Martin.

Kalon an Tad Maner a zo douget da Gemper ha miret e Kelenndi ar Jezusted. met netra ne c'hell dont a-benn eus parrezianiz Plevin hag o amezeion, hag a vir en o zouez korf ar Misioner Meur, a-enep da eskob Kemper, mnet start koulskoude d'e zegas d'e iliz-veur.

~~~~~

Labour an Tad Maner

en e visionoù

N'eus tu ebet da ober an diforc'h etre ar pezh a zo diwar ijin an Tad Maner en doare da frammañ e visionoù hag ar pezh a zo bet aliet dezhañ gant Mikael an Noblez pe gant tud all. Met meur a vennoz-diazez a zeu, hep mar, digant hemañ.

+++++

Al labour war-dro ar fideled :  
krediñ ha bevañ diwar grediñ

Pledomp da gentañ gant ar fideled. Unseurt e veze, peurliesañ, engroez daremprederion ar Misionoù : maezidi-brezhonegerion a veze anezho.

Ar stummidigezh a veze da reiñ dezho n'oa ket hepken e-keñver ar Feiz, met muioc'h c'hoazh e-keñver ar bevañ diwar ar feiz. Marvet n'oa ket ar feiz en hor Bro : anez da-se n'o dije ket ar Misionoù gellet sachañ, evel m'o deus graet, tud a-vil-vern, hag eus a-bell alies. Met harzet e oa outi dispakañ, bleuniañ ha frouezhiñ.

Krediñ

Diouzh pleustradegoù ur Mision - hag a bade peurliesañ ur miz - e welomp penaos e veze stummet o feiz d'ar fideled. Bez'e oa evit se : ar "c'hendivizoù", ar c'hatekizerezh, ar prezegerezh, an Taolenoù, ar C'hantigoù 'spirituel', ar Brosesion Veur.

Ar "c'hendivizoù" pe ar "c'hoñferañsoù"  
Da beder eur e kroge an devezh mision, gant ar pennoù diouzh ar mintin, renet gant unan eus ar visionerion, hag a lake ivez an dud e-tailh da

glevout an oferenn, hag a veze lavaret gant an Tad Maner. Echu an oferenn, ar Misioner a ro c'hoazh displegadurioù war he divoud. An Tad Maner a bign neuze er gador evit ur c'hendiviz, ur "goñferañs": ar goulenoù hag ar respontoù a zeu eus an eil tu hag egile, ken e c'hell an Tad anaout ouzh peseurt tud en deus da ober, hag e selaouerion degemer endeo kalz sklerijenn war ar pezh a ra diaes dezho.

Krediñ : ar c'hatekizerezh

Ar c'hatekizerezh a vez graet en iliz, etre ar pred da greisteiz ha div eur. An Tad Maner, pe unan eus ar re varrekañ eus ar visionerion, - da skouer, Aotrou Trevaria pe Aotrou Kerizag, a loc'h gant ar gwirionezioù-diazez, evel pa ne ouiije an dud netra 'n holl eus gwirionezioù ar feiz. Mikael a zo bet, a-raok pep tra, ur c'hatekizour ha diwar ar bloaz 1625 zoken, en deus ehanet da-vat da brezegenniñ (daoust d'e varregezh) ha lakaet dre skrid diwar be abegoù : e skrid, siwazh, a zo aet da goll. Daoust da se, n'eo ket diaes divinout daou eus an abegoù-se. Da gentañ, da dud dizesk pe e riskl da vezañ dizesk, e ranker kinnig traoù resis, diouzh chom garanet en o speredoù. D'an eil, evit sankañ traoù nevez e speredoù tud a live liesseurt, e doare ma teuo boutin etrezo an traoù-se, e ranker en em gemer evel ma reer er skolioù. Anez, al labour-diazez-se ne c'hell ar prezegennoù gwellañ nemet tremen dreist pennoù an dud, pe en ur hilligañ dezho o skouarn, pe en ur o lakaat war o elloù, pe en ur lakaat... da gousket.

Krediñ : ar prezegerezh

Koulskoude en doa ezhomm ar c'hatekizerezh bezañ buhezekaet, a-benn talvezout da urzhiañ ar vuhez diouzh ar feiz. Kement-mañ a veze tizhet dre ar prezegerezh. Ur brezegenn helavar a veze graet da zek eur ; ha diouzh an abardaez, da beder eur er

goañv, da bemp eur en hañv, e veze ur brezegenn all, war ar pezh a zo bet anvet, betek nevez zo, ar "gwirioneziou meur" : ar marv, ar varn, ar baradoz, an ifern. E-kreiz ar brosesion veur e veze c'hoazh ur brezegenn gant an Tad Maner diwar-benn ar Basion.

#### Krediñ : an Taolennoù

An Taolennoù, a vo komzet diwar o fenn larkoc'h, a zegase ivez tannoù sklerijenn da Feiz an dud.

#### Krediñ : ar c'hantigoù "spirituel"

Met ar pezh a lakae war loc'h, n'eo ket hepken ar Feiz, met ivez an Esperañs hag ar Garantez, en ur en em harpañ war envorusted ar spered ha dudi ar skouarn, eo an implij fonnus eus ar c'hantigoù "spirituel".

An dastumad eus ar re-mañ a voe embannet evit ar wech kentañ e 1641 ha, war-dro 1672, edod degouezhet gant an tregontvet embannadur anezhañ. Lakaet eo dindan an talbenn : "Canticou spirituel hag instructionou profitabl evit diski an hent da vont dar baradoz".

Ar pep pouezusañ eus ar gelennadurezh kristen a dremen er c'hantigoù-se ha talvezout a c'hellont da reiñ danvez d'ar bedenn. Implijet e vezent e pleustradegoù ar Mision ha kanet, da c'houde, gant an dud dre bevar c'horn ar Vro. Ar visionerion o-unan o deske d'an dud. Diouzh ar mintin, goude ar c'hendiviz, e-pad ma veze darn o kofez, ez ae ar peurrest er-maez eus an iliz evit deskiñ kantigoù; e-ser deskiñ ar pozioù, e veze roet diskleriadurioù berr war o ster. Añ Aotroù Kerbirioù, hag en deus roet dimp e galleg an tañva eus ar c'hantigoù "spirituel", a skriv kement-mañ : "Dre douez ar c'hantigoù en em sil ur c'hwezhadenn a Feiz nerzhus. Santout a reer birvidigezh abostolek an aozer. Ar grederion o selaoue (hag o c'hane) a veze

lakaet dirak an drouc'hoari etre ar vuhez hag ar marv." Evito da vezañ pleustrek a-raok pep tra n'eo ket ar C'hantigoù "spirituel" hep talvoudegezh lennegel. Ha berzh o deus graet e-pad pell amzer.

#### Krediñ : ar Brosesion veur

Pep Mision a veze klozet dre ur Brosesion veur. Ar Mision en e bezh a oa evel ur brientadeg e-keñver ar brosesion-mañ. Ar Brosesion veur a oa ur seurt c'hoariva sakr war vale, an arvestoù anezhañ c'hoariet gant tud o taolenniñ degouezhioù meur ar Silvidigezh hervez ar Skritur Sakr. Er penn-kentañ, da skouer, e teue personajoù an Testamant kozh : ar Pennadoù, ar Brofeded, sant Yann-Vadezour; war o lerc'h an ebestel, an avielerion, an daouzek diskibl ha tri-ugent. Da c'houde e teue "Kelaouidigezh ar Werc'hez", "Kraou Nedeleg" gant ar vesaerion hag ar vajer. Al lodenn vrasañ a veze graet gant dibunadur ar Basion; ha war houmañ, peurliesañ, e prezege an Tad Maner, pa vezed degouezhet e-kichen an aoter-ehan evit ar Sakramant (rak ar Brosesion veur a veze ivez ur brosesion-ar-sakramant).

E-kerz ar Mision e veze bet dibabet ha prientet an dud a zlee c'hoari tudennoù ar Brosesion. En doare-se e sanke degouezhioù-diazev ar Feiz, koulz lavarout, anezho o-unan er speredoù hag er c'halonnoù. Ha kalz kemmidigezhioù-ene a c'hoarveze diwar ar Brosesion veur.

#### Bevañ diwar grediñ

Met pleustradurioù all a veze er Misionoù, e-sell da zeskiñ d'an dud bevañ diouzh ar feiz.

Bevañ diwar grediñ : Pediñ ha daremprediñ ar Sakramantoù  
Da gentañ e teskent pediñ : pedennoù diouzh ar

mintin, da beder eur, a-raok an oferenn ; pedennoù diouzh an noz e dibenn an devezh, war-lerc'h bennoz ar Sakramant. Gant ar c'hantigoù o devez testennoù boutin da bediñ a-stroll ha kenkoulz all pep hini diouzh e du. Testennoù-skouer a bedennoù d'en em brientiñ d'an oferenn, d'ar gomunion, da ober war-lerc'h ar gomunion a veze lakaet ivez en implij hag a chome en eñvor an dud. Bemdez, goude div eur, ar re na vezent ket o kofez a c'helle deskiñ penaos ober o fedennoù, penaos furchal o c'houstiañs, penaos en em gemer evit kofez ha komuniañ, penaos lavarout o chapeled. Bep mintin, a-raok an oferenn, e tesked, tamm-ha-tamm, penaos en em zougen e-pad ma veze-hi o ren ; rak e latin penn-da-benn e oa an oferenn d'an ampoent.

Ar re a gemere perzh en ur retred-mision a c'helle ivez deskiñ ar bedenn-a-galon, ur stumm-pedenn dizalc'h e-keñver pep sterniad digemm a gomzennoù.

Bevañ diwar grediñ: ar vuhezegezh kristen  
Daremprederion ar Misionoù a veze ivez stummet en o youl hervez an Aviel. Da-se e talvez, anat eo, ar prezennoù : drezo e veze krouet un dro-spered stabil. Met evit tostaat ouzh ar vuhez pemdeziek e veze implijet an Taolenoù. Diskleriadur an Taolenoù a c'hoarveze goude div eur, pa ne veze ket a gentelioù pleustrek all. Kent mont larkoc'h e ranker eveshaat penaos n'eo ket hepken war ar vuhezegezh rik met, kentoc'h, war ar vuhez speredel o teurel war ar vuhez speredel e roe an Taolenoù kentel.

An Taolenoù a voe fiziet en Tad Maner gant Mikael an Noblez, hag en doa graet ha lakaet ober kalz implij anezho. E Landernev, e 1613, eo e welomp anezhañ, evit ar wech kentañ, o tiskleriañ taolenoù, bet aozet evitañ, war e gentel, gant Frañseza Troadeg.

N'ouzomp ket pegoulz e teuas dezhañ ar soñj da sevel taolenoù. Met e-pad e dreuz kentañ e Konk-Leon eo e kavas, hep mar, an tu da seveniñ ar soñj -se. Adalek ar XVvet kantved e kaver taolenoù engravet war brenn, o tiskouez ar reuz a ra ar pec'hed en eneoù. Kavout a reer evel-se, pe ur planken gant eizh skeudenn (50 x 35 ktm) pe eizh planken gant pep a skeudenn (12 x 10 ktm)

Soñjal a c'heller en deus Mikael an Noblez krouet da nebeutañ dek taolenn ha tri-ugent. Ne chom nemet pevarzek anezho, miret en eskopti Kemper. Bez' o deus etre 0,80 m ha 0,90 m a hed hag etre 0,50 m ha 0,60m a lec'hed ? N'oant ket graet, anat eo, evit bezañ diskouezet d'ur c'halz a dud, met studiet gant ur bodadig hag o lakae da dremen eus an eil d'egile. Roet ez eus bet dezho an anv a "daolenoù divunadennaouek". Ret e veze e gwirionez lezel amzer gant ar sellerion da glask o c'hompren ha kaout unan bennak anaoudek evit o diskleriañ. Bez' e oant ivez taolenoù arouezel pe, ma kavit gwelloc'h, parabolennoù skeudennet.

N'eus ket tu bremañ, re hir e vefe, da reiñ an disterañ tañva eus Taolenoù Mikael an Noblez. Ar pezh a rankan merkañ eo ne oa ket anezho ur stumm katekizerezh, met ur benveg etre daouarn ar blenier -eneoù eus an dibab ma oa Mikael an Noblez. Ganto e teue a-benn da zeskiñ da dud dister hervez ar bed lezennoù ar vuhez speredel, ar vuhez hervez lusk ar Spered Santel. Ganto ne dizhe nemet nebeut a dud, gwir eo, met an nebeud-se a veze tizhet don hag a zeue da vezañ un tamm goell e-kreiz an engroez. Bez' e oant, e gwirionez, ur skol war disprizezh ar bed, hervez e c'her-stur.

E-kerz an emweladenn, e Konk-Leon, etre an Tad Maner ha Mikael an Noblez, e komzas hemañ dezhañ a-zivout e Daolenoù hag e alias da gelenn an danvez anezho. Met, hervez an testennoù, an Tad Maner, e-ser ober implij eus taolenoù Mikael an

Noblez, pa veze talvoudus henn ober, a save pe a implije taolennou all, hervez an dud en deveze da ober outo. Rak an taolennou a rank bezañ, war an hevelep tro, diouzh doare ar blenier-ene ha diouzh doare an eneoù bleniet. Peadra a zo ivez da grediñ e voe implijet gant an Tad Maner taolennou bras a-walc'h da vezañ diskleriet eus ar gador.

Bezef a vezo, implij an Taolennou, e stumm pe stumm, en deus padet war vetek nebeut, betek diwezh ar misionou e Breizh, hag a c'hoarvezas etre 1965 ha 1970. Divent eo, hep mar, ar vad o deus graet.

Bevañ diwar grediñ : ar retredoù-mision  
E 1677, evel maz eo merket, e lakaas an Tad Maner da-vat retredoù e framm ar misionou. Abaoe 1670 ez ae en-dro e Kemper an Ti-a-Retred diazezet war e atiz ha renet gant ar Jezuisted. Met ezhomm a oa da ginnig d'an dud na c'helljent biken mont du-se an tu d'ober un tamm retred. Dre-se, e-pad ma rene ar mision evit an holl, ar re a felle dezho ober ur retred a eizh deiz a c'helle reiñ o anv. Tri rumm retretourion a veze savet evel-se, betek 500 e pep hini. Dezho e veze gellet, anat eo, digeriñ frankoc'h an hent d'ar vuhez speredel... D'ar re o deveze kemeret perzh, a-ziaraok, en ur mision ordinal e c'helle bezañ talvoudus-bras heuliañ ur retred e-doug un eil mision.

Bevañ diwar grediñ : Justis ha Karantez  
E-ser kaout an dro da reizhañ o darempred gant Doue e kave an dud ivez an tu da reizhañ o darempred gant o nesañ.

War an dachenn-mañ eweler anat e c'hoarveze an droug, a-raok pep tra, diwar an diouer a justis hag a garantez. E "Deizlevr ar Misionou" aozet gantañ evit Roma e verk an Tad Maner, evit pep mision, niver ar c'homunionou hag hini ar c'hemmidigezhioù-ene, met ivez hini an divroc'hadennoù (an

adskoulmadennoù-darempred) hag hini ar restaoladennoù. Diwar-benn ar re-mañ e veneger en istor ar Misionou, penaos e oa daou pe dri visioner, dal-c'het gant lezenn an tevel, ha karget eus ur c'hacier anvet kaier ar restaoladennoù. Merket e veze warnañ anv ha chomlec'h kement hini a veze ur restaoladenn d'ober dezhañ, gant ar gont a arc'hant a veze anezhi ; ar misioner a roe un testeni-resevidigezh d'ar restaoler, hag hemañ a veze neuze divec'hiet e goustiañs. Niverus-bras e veze, bep bloaz, ar restaoladennoù, kenkoulz hag an divroc'hadennoù, lakaet da c'hoarvezout gant ar Misionou.

Bevañ diwar grediñ : an emskiant eus ar renk a ezel e-barzh an Iliz

Damzivizout a reomp pegen fromus e c'helle bezañ kemer perzh en ur brosesion urzhiet evel an hini a gloze ur Mision. Dre an holl skiantoù e c'helled santout pegen gwir eo e c'hoarvez ar silvidigezh gant ur bobl a-bezh ha silvidigezh an hinienn e diabarzh ar bobl-se ; santout a c'helled pebezh preder a gemer Doue an Tad gant e Bobl, kaset war-du ennañ gant Jezuz Krist, dre hent ar groaz. N'eo ket souezhus ma veze kemmet en o ene kement a dud gant ar Brosesion veur.


Muioc'h c'hoazh, marteze, a c'helle en em santout izili eus Pobl divent an Aotrou Doue : ar re a gemere perzh er Gomiadeg a c'hoarveze e dibenn ar Mision hag a veze graet evit dieubidigezh an Anaon. Ar gomuniadeg-mañ a bade a-wechoù ur beurevezh a-bezh, gant an niverus ma veze an dud. Anat eo n'he deveze seurt diskeladeg a feiz a dalvoudegezh, nemet diouzh ma klote doareadur-diabarzh an hinienn gant ster an oberenn voutin : ar mision en e bezh a veze graet end-eeun evit tizhout ar c'hlotadur-se.

Bevañ diwar grediñ : kudenn ar Sabad

Ur gerig a lavarín, evit echuiñ, a-zivout ar Sabad - ur seurt kevredad kuzh, e-lec'h ma c'hoarveze gant ur bern tud bezañ sachet gant an droukspered ha strobínellet gantañ, betek en em ouestlañ dezhañ penn-da-benn. Bodadegoù ar Sabad a veze graet e-kreiz ul lanneg vras ha digenvez, sklerijennet gant ur bern gouleier rousin ha peg. An daremprederion, tud a bep renk er gevredigezh, beleion zoken, a gase o amzer gant a bep seurt c'hoarioù. E-kreiz ar vodadeg e rene un euzhvil skrijus, ma veze kaset d'e gavout ar re nevez-deuet. An euzhvil a bromete dezho plijadur penn-da-benn o buhez, war-bouez en em ouestlañ dezhañ korf hag ene. Maz asantent, e vezent lakaet da zinac'h kement a rae anezho kristenion. Ma felle dezho, da c'houde, dont war o c'hiz, an droukspered a heskine anezho pezh a c'helle.

E Sant-Gwenn, trev eus parrez Mur, e dibenn 1649, eo e kejas an Tad Maner gant tud ar Sabad evit ar wech kentañ. Buan e tizoloas pegen skignet e oa an droug. En ur en em harpañ war ul levr latin bet roet dezhañ dek vloaz kentoc'h, gant Mikael an Noblez, ez aozas un hentenn da implijout e kofezadur tud ar Sabad. Eskob Treger, an Aotroù Balthasar Grangier, en devoe tro da studiañ ar gudenn gant an Tad Maner hag e genlabourerion, ar re-mañ o vezañ bet diskuliet dezhañ. Evit he diskoulmañ ur wech evit mat, ez eas da Bariz e-lec'h ma voe barnet an afer gant ur bodad-tud, e-lec'h ma kaved eskob Pamiers, hini Boulogne, sant Visant a Baol hag ur seizh pe eizh a zoktored. Tri miz bennak e padas ar burutelladur. D'an eil a viz c'hwevrer 1658, holl izili an emvod, a-unvouezh, a verkas dre skrid, e kavent mat hentenn an Tad Maner. Neuze e voe roet dezhi un dalvoudegezh lezennel gant eskibion Treger, Kernev ha Leon, an eil war-lerc'h egile. Ne baouezas ket ar pismigerezh daoust da se.

Gant an Tad Maner avat ez eas ar gounid, war an dachenn ma oa ret kaout warni ar gounid : an emouestlidi d'an droukspered a c'hellas bezañ dieubet diouzh heskinerezh ha levezon hemañ. Un droug eus ar re washañ a oa bet lakaet ehan dezhañ.



Ar veleion hag ar Misionoù

Marevezh ar Misionoù er XVIIvet kantved a voe ur marevezh a zasorc'hidigezh speredel evit ar vrezhonegerion gristen dreist-holl re Gernev, er penn-kentañ. Met buan e vije aet war goazhañ an advuhezekaenn-se ("revival"), ma vije mouzhet outi ar veleion ha, da gentañ, ar Bersoned. D'ar re-mañ e oa divizout penaos ha gant pe skoazell e vefe stummet, hervez an Aviel, o farrezianiz. Ma oa bet ken bras an enebiezh ouzh Mikael an Noblez hag ouzh mennoz ar Misionoù, eo dre ma seblante d'ar Bersoned e klasked mont e-biou d'o beli pe lemel houmañ diganto.

Met an eskibion en em lakaas krenn a-du hag a reas d'an traoù loc'hañ. Tamm-ha-tamm e tizoloas ar Bersoned, en o farrez o-unan pe e parrezioù o amezeion, petra 'oa ar Misionoù ; tamm-ha-tamm e tizolojont e oa tu da labourat e brezhonegevit silvidigezh an eneoù ; tamm-ha-tamm, speredek evel ma oa ar bras anezho, e teskjont penaos prezeg, ober katekiz, reiñ ar sakramantoù, bleniañ an eneoù en un doare talvoudus d'an dud, en ur dremen dre an hent e rankent mont dezhañ : hent ar brezhoneg ! Ar Misionoù a zegase dezho skouerioù, kentelioù, hentennoù. Int-i hag a oa eus ar remziadoù diwezhañ kent savidigezh ar c'hloerdiou, a veze lakaet e-tu da zastum ur stummidigezh-klokaat hag a oa, a-raok pep tra, ur gemmidigezh-ene.

An eskibion hag ar Misionoù. An Iliz ha poblañs ar vrezhonegerion.

An eskibion, d'o zro, o vezañ ma kemerent perzh alies e labour ar Misionoù, o deveze tro da dostaat ouzh al lodenn niverusañ eus o fobl ha da vevañ, e-doug mizvezhioù a-bezh e bed ar brezhoneg. En doare-se e kouezhe e bruzun ar speurenn a oa o sevel etre beleion ar parrezioù o vevañ kenetrezo e galleg, hag an engroez a gouerion dilezet en o brezhoneg hag o dizeskoni e-keñver ar Feiz. Dont a rae boutin etrezo (war ur gont a oa) ar Feiz hag ar yezh, ken e teue da seblantout na c'helle ket ar re-mañ mont an eil hep eben.

Gant Misionoù ar XVIIvet kantved ez eus bet krouet ur stumm poblek a gatoligiezh hag en deus padet betek Hollsened Vatikano II, war-hed tri-c'hant vloaz eta. Ha ne c'heller ket lavarout e vefe c'hoazh peurziverket a-ziwar hor Bro an enlouc'hadur lezet warni gant Mikael an Noblez, an Tad Maner, o c'henlabourerion hag o c'henlabourezed.

Gwir eo e teujont en ur mare ma chome c'hoazh an Iliz e Bro-C'hall digabestr a-walc'h da dizhout a-zoare an eneoù, a-vloc'hadoù. Ma teujont avat, dre youl Doue eo e voent lakaet da zont.

Pa sanker en istor ar marevezh anezho, e sanker en un aergelc'h burzhudaouel hag a sebez ac'hanomp p'he c'heñverier ouzh hini an amzer-vremañ. Met re verr, re skort eo ar pezh am eus displeget a-benn adkrouiñ dirazoc'h an aergelc'h-se.

Maoris ar C'Hollo

""""""""

ATODENN

Diwar-benn Misionoù  
ar XVIIvet kantved  
e Breizh :  
Mennoz un arbennigour

Gant aon na vefemp douget d'en em douellañ hon-unan war braster an donezon bet graet gant Doue d'hor Bro dre labour ar Misionoù er XVIIvet kantved e tegasan amañ barnadenn ur beleg gall brudet, dezhañ barregezh dreist war seurt tachenn : an Aotrou Herri Bremond (1865-1933), oberenn ur pikol oberenn war "Histoire littéraire du sentiment religieux en France."

Ar pezh en deus gellet meizañ ervat eo an disheñvel maz eo bet, en o amzer, ar Misionoù e Breizh. Met ar pezh n'en devoa ket, war a seblant, an tu da veizañ eo ar pennabeg d'an ezhomm eus seurt misionoù, kenkoulz ha braster an ezhomm-se.

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

"Dic'hortoz eo na vije bet den, betek vremañ, o tanevellañ en un oberenn ouiziek, ha dezhi neuz veurdezhus, adavielekadur Breizh er XVIIvet kantved. An nebeudig a vuhezskridoù a zo en hor c'herz war an divoud-se, kentoc'h eget kemer al lec'h anezhañ, a laka, en enep, brasoc'h ar c'hoant eus un tamm labour hollzispiegus hag a rofe dimp an tu da jediñ dellidoù pep hini eus an tudennoù, da vont a-hed gant ar prientiñ, gant ar c'hrogadoù-hent, gant an disoc'hadoù eus ar gourskedus a "revival" hag a zo chomet gantañ, en e bezh, e greñvder, e-doug hanter-kant vloaz, hag a zegas koun, war gement a boentoù, eus istorvezh derou ar gristeniezh. Bez' ez eus bet ganimp, d'an hevelep mare, e-



leizh a visionoù all : e Normandi gant sant Yann Eudes ; e Loeren, gant sant Pêr Fourrier ; e Limouzin, e Lingwadoz hag e Prouvenso gant an Tad Lejeune ; er Velez hag er Vivarez, gant sant Frañsez Régis ; e Pariz zoken, gant an Aotroù Olier hag e geneiled ; un tammig e pep tu gant diskibion sant Visant a Baol ; met hini ebet eus an embregadennoù-se nemet, marteze, un deiz bennak, misionoù Normandi, ne vroud an evezh en hevelep doare gant Misionoù Breizh ; hini ebet, war a gredan da vihanañ, n'he deus graet kement a verzh. Kalz gred, hep mar, - ha kemmadennoù-buhez diniver ; dimp-ni evelkent, netra dic'hortoz. Bez' ez int misionoù damheñvel, kalz pe nebeut, ouzh re hon amzer-ni. War-bouez an dreistijin, an Aotroù Combalot (beleg gall eus an XIXvet kantved) a dle bezañ a-vec'h disheñvel diouzh an Tad Lejeune. Frañsez Régis, Visant a Baol, anezho tud vertuzus, tud dibar evel an holl sent, a seblant arnevez-krenn, koulz lavarout : a-vec'h ma vijemp souezhet ma tegouezhjent hiziv war hon hent. Un aes a arnod a roio dimp an tu da wiriañ ar reizh maz eo an damverzadur-se. Ra gemeror, da skouer, ha ra lennor, gant kement-hakement a dizh, diouzh un tu buhez Visant a Baol gant an Aotroù Maynard hag hini Frañsez Régis gant an Aotroù Vianey ; diouzh un tu all, buhez Dom Mikael an Noblez gant an Aotroù Le Gouvello ; hag hini an Tad Maner gant an Tad Séjourné. Ma ne vije ket dirazomp an deiziadoù, ha krediñ a rajed ez eo an daou rumm-se a visionerion eus an hevelep marevezh, koulz lavarout, eus an hevelep bro ? An Noblez ha Maner a zo eizh pe nav gantved yaouankoc'h Fiñval a reont e-mesk ar burzhudoù ken divec'h ha sant Paol pe sant Kaourintin...

Kenkoulz all, bez' hon eus, war ar poent-se, un testeni n'eus nemeur da ziskrediñ warnañ, hini an Tad Boschet, jezuiist, hag a laka embann e 1697 ar buhezskrid kentañ eus an Tad Maner. Fentus-tre eo

e rakskrud ha diwar dorn un den poellek, sebezet holl o soñjal en traoù divoas e vo ret dezhañ o danevellañ. O chom edo n'ouzon ket pelec'h, met neket e Breizh, ha mennet start e oa da echuiñ e levr hep fiñval diouzh ar gêr. "Degaset e voe din" emezañ, "un adksrid eus an Deizlevr en deus an Tad Maner skrivet e-unan... Ha, war ar marc'had, ur pikol levriad eus e vurzhudoù. Kavout a ris eno fedoù ken marzhus ma voen war-nes diskrediñ war an adskriver penaos en doa kaeraet an traoù evit reiñ lufr da c'hloar an den santel." Diwezhatoc'h e teu dezhañ eñvorskridoù all "suezhusoc'h c'hoazh eget ar re gentañ". Neuze, pelloc'h, aet skuizh gant se hag hep gellout plegañ da labourat war un dachenn hag a seblante dezhañ diasur, "e ris," emezañ o kenderc'hel, "ur veaj da Oueled Breizh, evit kaout ervat deskamant war va danvez-studi." Ni hor bize kroget gant se.

Ur wech degouezhet war al lec'hioù, ha temz-aer Breizh o vroudañ ennañ moarvat ijin an istorour, "e krogis da welout penaos e oa startoc'h eget ma soñjen an dachenn m'am boa da ober warni ar savadur."

Evezhiadenn didro, houmañ, ha donoc'h eget ma kav dezhañ, "ha den ebet o vezañ gouest da c'houzout gwelloc'h ar pezh a selle ouzh an Tad egetañ e-unan, e kredis e tleen kaout va gwalc'h gant e Zeizlevr. Met a-raok en em vataat eus eñvorskridoù ken mat e fellas din spisaat pevar seurt fedoù dic'hortoz.

1.- Kemmadennoù-buhez pec'herion vras a zo, hag o doa en em lezet da vont betek ar re ziwezhañ eus an dirolladurioù hag a zo bet sacht gant Doue er-maez eus o dizurzhoù dre sikourioù dreistvoas, evel maz eo emziskouezadennoù stank... hep komz diwar-benn un donezon dibar d'an Tad Maner da sankañ e-barzh ar c'houstiañsoù kuzhetañ.

2. Kalz efedoù bet c'hoarvezet a-enep da red rei-

zhek ar pennabegoù izelañ, ha d'an ampoent end-eeun ma oa ezhomm anezho (glaveier o tont a-daol-trumm war-lerc'h marevezhioù hir a sec'hor, barroù-arnev sioulaet h.a.)

3.- Ar barroù-frouezh sebezus douget gant ar misi-onoù (kêriadenoù a-bezh kelennet ha kemmet penna-da-benn en o buhez, dindan nebeut amzer, gant daou pe dri visioner).

4.- Un niver bras a bareadennoù burzhudus bet graet gant an Tad e-doug e visionoù.

An traoù-se ne oant ket hep "lakaat diaes" an Tad Boschet. Gouennata 'reas eta kement a oa e Breizh a dud gouiziek, e-touez dreistvevidi ha testoù kement-all a vurzhuoù. "Redek a ris betek lark a-walc'h en eskopti Leon, gant aon na ziflip-fe diganin ur misioner kozh, leun a zellid, hag a oa aet gwenne vlev e servij e nesañ... Skrivañ'ris d'an dud-a-Iliz n'am boa ket gellet gwelout ha respontoù kentelius-meurbet am boe diganto. Meur a hini am enoras betek dont d'am c'havout da Gemper. O fediñ a ris da lavarout din petra a soñjent diwar-benn ar pevar seurt a fedoù marzhus a c'houlennen ma vefent lakaet diarvar."

Hag a-walc'h a aon en deus 'ta an den dispar rak ar burzhudoù! A-benn ar fin e ro dezhañ e-unan ur reolenn. War graf ar c'hemmadenoù-meur a vuhez ha war an emziskouezadennoù c'hoarvezet en o raog e lezo..."gant un all bennak al labour-diforc'hañ"..."gant aon da lakaat re dev e levr". Met dizaonkaer e lavaro ar peurrest, war-bouez henn disteraat un draig. "Goude-holl," emezañ outañ e-unan, "perak bezañ souezhet ma vefe distroet ar feiz kristen e Breizh dre an hevelep hentoù m'he doa en em silet war an douar a-bezh e derou an Iliz?"

Setu, pelloc'h, ar ger rik o tegas an alc'houez d'an istorvezh burzhudus-se en e bezh. Renerion ar Misionoù e Breizh o deus kompezet, koulz lavarout,

gant o spered didro ha birvidigezh o feiz, an islonk a oa etrezo hag an oadvezh alaouret. Danevel-  
lañ a raent etrezo an eil d'egile "penaos o doa  
sant Kaourintin ha seizh eskob all lakaet kristen  
Goueled Breizh, penaos e oa deuet sant Visant Fer-  
rer, meur a gantved diwezhatoc'h, da nevesaat an  
deoliezh a-ziagent. Perak chom hep kilbignat lar-  
koc'h c'hoazh ha betek mammenn stêr ar gristeniezh  
...? O tanevellañ unan eus e visionoù e skriv an  
Tad Maner: "Seblantout a ra dimp gwelout hinienoù  
eus an efedoù a c'hoarvezas e Jeruzalem, pa emban-  
nas eno an Ebestel an Aviel."

Tennet eus :  
Herri Bremond.- Histoire  
littéraire du sentiment  
religieux en France.

Levrenn V :  
"Aloubadeg ar gevrinelezh.  
Pennad II.  
Yann Rigoleg, Julian Maner  
hag ar Misionoù e Breizh.  
pp.82-86

Lakaet e brezhoneg gant Maoris ar C'Hollo.

ESKOPTIOU BREIZH  
EN AMZER MIKAEL AN NOBLEZ  
HAG AN TAD MANER



Eskopti Dol a zo merket e du ; an hini bihanañ eo. Notit evelkent e ranker stagañ outañ enklozvaou stank en eskoptioù all. Un nebeut brezhonegerion a chome c'hoazh neuze en eskopti Naoned, e kornbro Gwerann.

UN TAMMIG ADDISPLEG

Plijet-bras on bet oc'h embann studiadenn gaer Maoris ar C'hollo; seul vuioe'h plijet on bet ma oa poent e gwirionez embann ar wirionez diwarbenn an daou zen-meur-mañ hag o deus bet ul levezon vras war vuhez speredel o c'henvroiz, brasoc'h moarvat eget hini n'eus forzh peseurt rener politikel. Se a vez disoñjet alies.

Betek nevezik zo, da nebeutañ betek ar brezel diwezhañ, e oa anavezet mat Mikael an Noblez hag an Tad Maner e-touez ar bobl. Soñj am eus e oa du-mañ, er gêr, e 'Cambrai', e-pad va bugaleerezh, ur buhezskrid eus Mikael an Noblez hag am boa lennet pa oan unnek pe zaouzek vloaz. E galleg, eveljust, e oa skrivet hag un embannadenn gwall gozh e tlee bezañ anezhañ rak hanter dispennet e oa ar skouerenn a oa ganeomp : mankout a rae ar golo hag ar bajenn-talbenn zoken, ha peuzdiswriet e oa ar c'haieroù. Setu, n'oufen lavarout piv 'oa an aozer ; soñj am eus a-hend-all eus al lizherenn dreut hedoa servijet da voulañ an oberenn. El levr -se koulskoude em boa dizoloet ar brezhoneg skrivet, ur bomm bennak, ur c'hrennlavar a oa meneget e korf al levr. Skoet e oa bet va spered ivez gant istor Gwaieniz bet kastizet dre ma n'o doa ket selaoet prezegenn Vikael, ha kollet ganto damc'houde o strollad-listri en ur barr-amzer. Diwezhatoc'h, pa oan deuet d'an emsav, em boa en em c'houlennet peseurt emskiant vreizhat a c'helle kaout Mikael an Noblez. Anat eo ne oa ket ur gall anezhañ daoust maz eo c'hoarvezet gantañ mont betek Pariz d'ur mare. Breizh avat a'oa c'hoazh un devoud en amzerhont hag ar stagidigezh a leze dezhi un dezvad politikel (pezh n'o doa ket Kembreiz d'an ampoent). Ne oa ket santet c'hoazh kennebeut efedoù sevenadurel ar stagidigezh. E latin en deus graet Mikael e studioù penn-da-benn: un den eus an azginivelezh

e oa, o lenn gresianeg evel ma lennomp galleg. A-hend-all, n'oa ket a hentoù da vont d'ar broioù-krec'h ; dre vag ez ae Mikael da Vourdel, d'ur vro n'oa ket anavezet kalz ar galleg enni d'an ampoent moarvat (hag en 'Ajen' nebeutoc'h c'hoazh) ; forzh penaos, tostoc'h kalz e oa ar gêr-se da Vreizh neuze eget Pariz. E Breizh zoken ez ae Mikael dre vor ivez eus Douarnenez da Gonk-Leon. Tost e oa Breizh d'he rezid c'hoazh d'ar c'houlz-hont.

Bro-C'hall a-hend-all, bepred er grez-hont, ne c'helle kinnig d'hor c'himingad na patrom sevenadurel na patrom stuzegezhel ; gant an Iliz hepken eo bet stummet Mikael an Noblez.

Distreiñ a ran da graf ar vroadelouriezh hag ar politikerezh dre vras. Tamall a reer hiziv d'ar visionerion ha d'an adreizhourion relijiel bezañ gwalleg ar politikerezh evit plediñ gant ar relijion sellet gant hor c'hemprediz, marksourion pe get, rak seurt tamall n'eo ket nevez, evel 'opiom ar bobl'.

An eilger kentañ a c'hellfed ober eo penaos ned eo ar 'politikerezh' nemet ur seurt relijion nevez he deus lakaet ar galloud politikel e-unan hag ar Stad e-lec'h Doue hag an Iliz, hag ez eo ar relijion-se ar gwir opiom nemetañ diouzh ma vir ouzh an dud da glask ur ster d'ar vuhez ha d'ar bezoud; difreterezh ha c'hoari gwadek a-wechoù n'eo ken e gwirionez ar politikerezh evit ar re bleustr anezhañ.

Hogen, dres, ez eo ar relijion-se, ar falsrelijion-se a zo bet distaolet gant Mikael an Noblez, an Tad Maner hag o skoazellerion. Iskis eo penaos e tremen an droienn "dilezel ar bed" evit bezañ un droienn relijiel glouar pa oa anezhi unan 'dispac'hel' e gwirionez, o talvezout, peurgent, disteurel ar galloud ha nac'hañ perzhiañ ennañ.

Un darvoudenn eus buhez Vikael en doa skoet va spered p'am boa lennet al levr am eus meneget a-us:

hini an duvell ma oa bet darbet dezhañ bezañ mesket ennañ p'edo oc'h ober e studi e Bourdel (un denjentil a oa eus Mikael) ; ar Werc'hez hec'h-unan he devoa tennet ar c'hleze a-dre e zaouarn (m'em eus soñj mat rak n'em eus ket adlennet buhezskrid Mikael an Noblez abaoe pellzo). Ha deveizet en doa an danvez misioneran emelladenn-se evel ur gouviadenn da "zilezel ar Bed" ha d'en em reiñ da servij ar C'hrist hag e Iliz (notomp en deus Mikael kemeret amzer a-raok respont da vat d'ar gouviadenn : da 30 vloaz hepken e voe beleget).

N'ouzon ket perak ez eus tud hiziv o faltaziañ ez ae ar Galloud hag an Iliz dorn-ouzh-dorn er Stad c'hall er XVIIvet kantved. Moarvat e klaske ar Galloud korvoiñ an Iliz e pep doare hag ar muiañ ma c'helle (an hengoun-se n'eo ket bet kollet e Bro-c'hall, bezit asur) ; met se a rae e sell d'he lazoù-int hepken. A-raok 'kouezhañ en devosion' e harpe Loeiz XIV stourm eneprelijiel Molière a oa gwarezet gantañ penn-da-benn ; ha, na petra, herzel a rae ouzh reizhveliezh an Iliz en e riez ar muiañ ma c'helle (skoazellet e voe en arvell-se gant an arc'heskob Bossuet e-unan). Ren a rae a-hend-all, divorc'hed-kaer, en Europa, brezelioù impalaour ha na vanke ket enno torfedoù-brezel end-eeun a bep seurt, en ur en em ginnig da azeulerezh e sujidi e-giz un impalaer roman (e livrez un impalaer roman e veze taolennet gant e livourion ivez). Kement-se holl a oa ar Bed ! Ha kompren a reer dre se perak e oa an hevelep galloud bepred ken gelenek ouzh ranncredenn ar Jañzenidi, da skouer ; abegoù a bep seurt a oa, unan anezho o vezañ ma n'en doa ezhomm ar galloud nemet eus ur gealiadurezh stadel hag eus un Iliz hepken evel emzivizerez talvouddek ; hogen un abeg all a oa : erbediñ a rae izili ar ranncredenn-se kuitaat ar Bed ha bevañ e sell eus ar Silvidigezh hepken, un emzalc'h digevredel-rik 'keta ; sur-mat n'oa ket

amaezhidi ar Roue Meur e chal gant tezennoù disivoudel pe get ar Jañzenidi o-unan. Ar pezh a nec'he anezho eo e vije bet tud o 'tisprizout' ar Bed, o tisprizout ar Galloud, o sellout outañ evel netra, evel dic'hoantus a-grenn. Seurt dismegañs, na petra, ne c'helle bet bezañ gouzañvet ganto.

En hon amzer-ni, moarvat, e hañvalfe bezañ demeradusoc'h keal ar perzhiekaat er politikerezh, ma talvezje ar perzhiakaerezh-se ur gwazadur kevredik-rik. Met, adarre, - luziet e vez ar re a fell dezho adreizhañ ar gevredigezh hiziv en un istor hag a zodiazet war nac'hidigezh trehontelezh Doue ha gwirionez an Diskuliadur kristen, a gleiz pe a-zehou e vent, rak an holl gostezennoù gall gwitibunan a ra dave kerkoulz d'un Istor Bro-C'hall o tapout e lein en amzer c'hloriustroc'herion-bennoù an Dispac'h Meur Gall, evel m'henn diskouez ar c'hofoù triliv a weled o pourmen en devezh all da gefñver an diskeladeg a-du gant ar skolioù ez-katolik e Roazhon.

Dellezout a rafe ur c'hraf all bezañ ensellet moarvat, hini an darempred etre adreizh katolik ar Misionoù e Breizh er XVIIvet kantved hag hini Metodistiz e Kembre en XVIIIvet pe c'hoazh advuheze-kaenn 1905-1906 en hevelep bro bepred. Moarvat ez eus meur a heñvelder etre an holl luskadoù-se : disoc'het eo emsav Metodistiz, da skouer, war adadarveradur ur relijielezh hag un deoliezh hag a denne da re ar Gatoliked (dre ensavadur ar "Seiat", ur pleustradur eus ur seurt blenierezh-ene, ambrougadegoù, dreist-holl e-kerzh advuheze-kaenn 1905-6, lakaomp, daoust ma ne oa ket mennet ar re-se, a gav din, da daolennañ buhez Hor Salver). En triwec'hvet kantved, moarvat, ne oa ket a vuzhudoù nag a emziskouezioù evel ma oa e Breizh er XVIIvet kantved ; met anadet ez eus hiniennoù anezho e-kerzh advuheze-kaenn derou an 20vet kantved e Kem-

bre : menegiñ a reer degouezh ur plac'h a lavare he doa gwelet ar Werc'hez, ur brotestantez anezhi (hervez levr nevez embannet R. Tudur Jones : Ffydd ac argyfwng Cenedl, eil levrenn). Moarvat e oa bet frouezh d'an adreizhoù-se, frouezh pouezus zoken : kalz tud a zo bet kanttroet hag a zo chomet feal da c'houde ; klask a ra ar Spered Santel, moarvat, labourat e kement doare ha dre gement hent ma c'hell, hep gwallañ an dirvoud brezel pe gevredadel ma kej gantañ : n'eo ket e roll, ha frankiz an dud a rank bezañ doujet, n'eus forzh penaos. Koulskoude n'en deus ket gallet peurgas da benn e oberenn e Kembre marteze en abeg da nammoù ur gevredigezh kristen bet forc'het d'ur mare diouzh ar gwir Iliz gant ar galloud politikel saoz (rak ne c'heller ket dioueriñ keal ar Gwir Iliz, daoust da bep tra). A-benn ar fin 'ta, en doa emsav Metodistiz gwashaet dizunvaniezh ar gevredigezh kristen e Kembre peogwir e oa bet degaset da groueñ ur framm dezhañ e-unan e derou an XIXvet kantved, hep darempred frammadurel ebet gant ar c'horfadurioù kristen all ; ha berrbad e oa bet frouezh advuheze-kaenn 1905-1906 peogwir e oa bet mouget prim war-lerc'h, e-giz un tan plouz. Ken disklaer e oa a-hend-all an anadennoù m'en em ziskoueze drezo m'en doa kavet gwell an hini a oa bet penngiriek d'an adreizh dilezel al luskad abred, dre ma touje na vije bet awenet a-wechoù gant an Droukspered.

Kement-se a ziskouez ez eo diaes d'ar Spered Santel oberiañ er-maezeus an Iliz, daoust ma klask henn ober a-wechoù (rannadur ar gristenion kene-trezo a zo politikel a orin hag a natur ha n'eo ket bet ar gristenion kiriek dezhañ war-eeun ; rak-se e klask ar Spered Santel harpañ ivez ar re en em gav er-maez eus an Iliz en abeg da zarvoudoù zo). Ar pezh a zo heverk avat e degouezh ar Mision-

noù e Breizh er seitekvet kantved eo e oa anezho un emsav ilizel o tennañ da vroudañ ar feiz ha da greñvaat unvaniezh an Iliz war un dro.

\*\*\* \*\*

Ret eo lavarout evit echuiñ n'eo ket didro a-walc'h hor c'hemprediz evit gellout reiñ ur ster da zarvoudoù dreistnatur. Evel m'hon eus bet tro da verkañ e nac'he ar C'hrist ober burzhudoù evit ar Farizianed, da skouer. Graet eo ar seurt arouezioù evit ar re a chom tost d'an natur hag a zo prest da anzav ez eo bet graet pep tra endeo gant Doue, - hag ez eo dister-meurbet perzh an Den en hollved. War ur mennoz kontrol avat ez eo diazezet hor sevenadur : an natur n'eo netra nemet un danvez krai ha krouet e vez pep tra gant Mab-den er gevredigezh.

Moarvat e chom yezh ar burzhud amsteriek bepred dre m'emañ perzhiek e daou ved war un dro, hep aparchantiñ davat d'an eil pe eben, dre ma ne vez ket aes digemmañ an darfellegezh, lakaomp, diouzh ar 'welouriezh' wirion. E seurt degouezh ez eo ar frouezh douget gant an darvoudoù, kreskidigezh an Iliz o tont da heul, da skouer, a bourchas ar merk-barn a ro an tu da gaougantañ dilested an darvoudoù-se end-eeun. Ne vefe ket mat avat disteurel dre reizh pep arouez burzhudel ; war var e vefed a-benn ar fin da veizañ an Iliz evel n'eus forzh peseurt strollad politikel, sujet dres d'an hevelep savelennoù hag int, ur soñj hag a vefe faziek, eveljust.

Y.O.

=====

Moulet gant ar gelaouenn Ar rener:Y.Ollivier  
CPAPP : 50 015